

Breizh Brevez

Oscar WILDE : Ar prins laouen

Youenn BRUSK : "Pouvoar" Tieu, al Lonker-kelien

Y. L. NORMAND : Kendalh Istor ar Habill

Da heul Patrig GOUEDIG : Dizoloi Enez Eusa

Evid ar vugale : 18 a leoriou all !

Danvez-Lezenn ar Gomunisted

N° 77 - 1984

BRUD NEVEZ

Kelaouenn vrezonég mizieg.

Miz eost - miz gwengolo 1984 **Niverenn 77.**

Rener: **Andreo Merser.**
Sekretour: **Jakez Salaun.**

An oll lizerou ha skridou a zo da veza kaset da Brud Nevez, 6, ru Beaumarchais, 29200 Brest.

Priz an niverenn-mañ: 10 lur.

Koumanant bloaz:

- priz ordinal: 70 lur.
- koumanant-skoazell: azaleg 80 lur.
- broiou estrañjour: 100 lur.

Eur houmanant a dalv evid 10 niverenn.

Ar chekennou-bank a zo da veza kaset war-eeun da: Brud Nevez, 6, ru Beaumarchais, 29200 Brest.

Ar chekenou-post a zo da veza lakaet war K.R.P. « Brud Nevez » 893-94 P Roazon.

Ar houmananchou evid ar broiou estrañjour a zo da veza kaset, e arhant peb bro, da: Dawson-France, B.P. 40, 91121 Palaiseau Cedex France.

I.S.S.N.: 0399-7014.

C.P.P.A.P.: 34 627.

Disklêriet hervez al lezenn:

Moulet ez-prevez gand Brud Nevez.

C. evid an oll bennadou.

N'eus ket a aotre da adembann eur pennad euz Brud Nevez heb beza bet an aotre d'henn ober.

Ar skridou hag ar pennadou a vez embannet e Brud Nevez n'emaint ket da veza lakaet war gont ar gelaouenn heh-unan, war gont ar re o-deus skrivet anezo hebken.

Ar skridou ne vint ket embannet a vo kaset endro ma vez tu.

Embannet e vez BRUD NEVEZ gand skoazell EMGLEO BREIZ hag hini ar CENTRE NATIONAL DES LETTRES.

Taolenn

A.M. Quemener: Taol touell.....	3
Eluned Rees: Kan.....	4
✕ Naig Rozmor: Kêrig va huñvre.....	5
✕ Jean-Daniel Richard: Kan ar goukoug.....	6
✕ Oscar Wilde: Ar priñs laouen, troet gand J.C. Miossec.....	7
✕ Youenn Brusk: « Pouvoar » Tieu al lonker-kelien.....	17
✕ Paotr Jeg: Endto da Vantan Zant-Jeg (II).....	28
✕ Yann-Loeiz Normand: Istor ar Habili (kendalh).....	37
✕ Yves Miossec: Kontadennoù ar bobl Fañch an Uhel.....	47
✕ K. Riou: Dizoloi Enez-Eusa da heul Patrig Gouedig.....	51
✕ K. Riou: Anaoud Bro-Skos.....	52
✕ K. Riou: Evid ar vugale: 18 a leoriou all.....	54
Emgleo Breiz: Eun eil danvez-lezenn.....	55
Kemennou.....	57
Leoriou nevez.....	59

Taol touell

Eun druiadenn ampoezon
d'ar baotred war o halon
Ken kaled ha mein
Gand korniaochou lemm

Ne gomprenin netra
War an doare da gomprenañ
An hini da luskellañ
Da vadaoui, ingalan

Da vousec'hoarzañ, d'ober tan
Evel ma ra deom al loened
Aozañ eur béd
Gand flouradou roet

E soñj din e komprenan
An doare da hoariellañ
Med kerkent e chañch an ton
Red oa din faziñ

Ken prim hag eur steredenn
Oh ober eun treuz sklêrijenn
Am-boa kredet
Am-boa gwirheñvelet
Am-boa huñvelet

Siwaz, din e vefe red
Cheñchañ... béd!

A. M. Quemener

Kan

Troiou 'zo
Pa vezan em arvest
Dirag poull soñjou an tan
E teu eur seurt sioulder voulos,
M'on kelhiet gand bleuniou ha musk.
Ha neuze
Evez geriou o tañsal,
Huderez din naered o horfou,
Hag en em astenn al linennou
Da oll viken
E-barz va zoñj.
Troiou 'zo
Ez eus ahanon-me ha den all ebed,
E vez mad an traou,
E douraval tomm ar flamennou.

„Cân“
Eluned Rees

Brezoneg gand **Mikael Madeg**

Kêrig va huñvre

War mogeriou va hramb e oa poltrejou flamm
Euz ar gêr am-eus greet beb noz e va huñvre
Poltrejou trohet gwechall gand va mamm
O tiskouez ar mêziou, Arvor parrez Sant Kê
Dindan e skeudenn e chom speg an hekleo
Euz he c'hoarzhou kenta, euz a feiz he ene
Ha toniou meur he joa euz an tre d'al lano
'Barz ar gêr am-eus greet e va huñvre.

Bihannig, ouz he dom, 'm-eus desket 'hed an hent
Roudou he yaouankiz, ano ar parkeier
A anve gand esmae 'vel ma vijent kerent
Perhenn oa d'ar brulu, d'askol an tevinier.
Kredi 'reen oa priñsez kastell Kergounadeh
Pa veze ar gwenan o lida he distro
Da heul kanaouenn ar feier er foenn seh
'Barz ar gêr am-eus greet e va huñvre.

Nijet eo da Bariz antronoz he eured
Kenavo bourkig koant, ar Voum ha Troñjoli.
En he malizennou oa bemiet kant poltred
Miret en he halon, dason ar morvrini.
Soniou marzuz he bro 'deus lusket va havell,
O-deus greet din tridal evel eur chantele.
Siwaz! ne gavan mui dour beo ar stivell
Er gêr am-eus greet e va huñvre.

Petra deu da veza va feunteunig Sant Yann?
A garfen displega da va zro marteze
Pa houlenno va mab gand e zaoulagad splann
Ar gêr am-eus greet e va huñvre.

Naig Rozmor

Kan ar goukoug

Kan ar goukoug am-eus klevet,
n'em-boa em yalh gwenneg ebed.

Ar bloavez-mañ e chomin paour,
ne vo ganin arhant nag aour.

Med petra `vern aour pe arhant,
– lavar din-me, va dousig koant –

pegwir em-eus da garantez
`zo ar brasa pinvidigez?

`M-eus ket c'hoant da brena madou,
feiz, nann! na tiez na pradou.

... Eun ti, padal, a blijfe din:
eun ti bihan gand eur jardin.

En ti-ze vefe brao beva,
douster ar vuhez da dañva.

Er jardin `vefe bokedou,
`rofen dit evid da bokou.

Ar wech all ne vin ket ken sod:
eur pezh moneiz `vo em chakod.

Jean-Daniel Richard.

Ar priñs laouen

An delwenn varzuz

E penn uhella ar gêriadenn e oa delwenn ar Priñs laouen o ren diwar eur piler braz. Gwisket e oa penn-kil-ha-troad gand follennou aour tano ha lugermuz. E-giz daoulagad en-doa daou vén safir luhuz hag eur mèn prisiuz ponner ha red e oa gantañ oh elfenni eston war bommel e gleze.

Na pegen mezevellet e chome an dud ouz e arvesti. « Ken kaer hag eur hillog avel eo » a lavare dicheg unan euz kuzulierien an ti-kêr a felle dezañ maga ennañ trivliadou arzeg. « Siwaz, n'eo ket evid diougana deom an amzer a vo warhoaz » a gendalhe an den kroget aon ennañ da veza tamallet gand ar voterienn abalamour d'e venoziou ispisial.

« Piou a hellfe chom dizeblant dirag ar Priñs laouen », a houlenne eur vamm dener digand he hrouadur a oa o skuilla daelou dindan an heol benniget. « N'eo ket ar Priñs laouen evid huñvreal na leñva an disterra. »

« Pegen eüruz on o weled ez eus unan bennag laouen braz en draonienn a dristidigez-mañ » a hrozmole eur paotr trist-meurbed en eur zelled gand avi ouz an delwenn varzuz.

« Heñvel ouz eun èl eo » a lavare ar gurusted gwisket ganto o zae ruz ha gwenn pa zeue ar brosesion er-mêz euz an Iliz-Veur evid ober tro ar vered.

« Penaoz an diaoul e ouzit an dra-ze » a houlenne diganto ar helenner war ar matematikou, rust e vouez. Morse n'ho-peus gwelet liou ebed euz hini anezol!»

«A! traou kaer burzuduz-kenañ on-eus en on huñvreou » a responte ar vugale dre ma krize ar helenner e dal gand an dipit. Ne oa ket evid mond larkoh war dachenn huñvreou ar re yaouank.

Daelou ar priñs

(Eun nozvez e tremenas eur vandennad gwennili dreist an delwenn. Unan anezo, eet skuiz dre forz beaji, a reas he zoñj chom da gousked e kêr).

Edo an hañv war an diskar. Ar wennilienn a spurmantas an delwenn a-zindani en he zav war he feul braz. « Emaon o vond da gluda du-hont evid an noz-mañ » a youhas a vouez uhel. « Amañ e kavin eur repu aveliet mad euz ar re freska. » Greet ganti he zoñj e touras ouz treid ar Priñs laouen.

«Eur gambr alaouret am-eus kavet » en em lavaras en eur deurel sellou a zisfiziañs tro-war-dro kent mond da gousked.

Edo war-nes laaad sioulig he fenn dindan he diouaskell pa gouezas ponner eun dakennad dour warni. « Na souezuz, » emezi. « N'eus ket an disterra koumoulenn en oabl fenoz! Emañ bali Sant Jakez o skedi en e wella ha setu eur barrad glao o tond. An temz bro e Breiz-Veur a zo spontuz a-walh a gav din. »

Trumm e kouezas eun dakennad all warni. « Da betra eo mad eun delwenn ma n'eo ket evid miroud al laboused diouz ar glao » emezi droug enni. « Red eo din diloja ha mond da glask eur siminal bennag evid tremen an noz. » Hag e tivizas nijal kuit warzu an toennou tosta.

N'he-doa ket c'hoaz digoret he diouaskell pa gouezas warni an drede diveradenn. He zellou a zavas... hag e welas... A! Petra a welas?

Daoulagad ar Priñs laouen a oa leun a zour ha daerou puill a oa o tivera sioulig a-hed e zioujod alaouret. Ken kaer e oa e zremm

dindan sklêrder al loar ma'z eas bihan kalon ar wennilienn en he hreiz.

—« Piou out-te? » a hiboudas-hi.

—« Ar Priñs laouen a vez greet ahanon » a oe respontet dezi.

—« Perag e skuilhez kement-se a zaelou, neuze? » eme al labour-sig. « Distrempet oll on ganit! »

—« Pa oan beo ha pa lamme eur galon em hreiz » a lavaras ar skeudenn, « ne ouien petra oa an daelou. E lez an dizour-si-kaer e oan o chom hag er palez-se e vez difennet groñs ouz an dristidigez dond en ti. An devez-pad eh ebaten gand va mignoned ha pa'z ee an heol da guz e kasen an dañsou endro tro-war-dro d'ar saliou meur. Endro d'al liorz ez eus mogeriou uhel med ken brao e oa toud an traou tro-war-dro din n'em-eus morse kredet goulenn petra 'oa en tu all dezo. Tud va falez o-doa greet ar Priñs laouen ahanon neketa, ha laouen-braz e oan a-dra-zur, ma heller lakaad plijadur hag eürusted kichenn-ha-kichenn ken diskiant ha tra! Evel-se eo em-eus bevet hag evel-se on marvet. Ha pa'z on eet da anaon o-deus savet ahanon war ar peul-mañ Euz ahalenn e hellan selled piz ouz digened ha dienez va hêriadenn hag evid d'am halon beza greet e plom n'on ket evid en em viroud da ouela.

Ar ruby a ya kuit

« Du-hont » a gendalhas an delwenn flour ha sklintin he mouez, « du-hont ez eus eun ti paour. Unan euz e brenestrou a zo digor hag er gambr e welan eur vaouez azezet ouz taol. He dremm a zo treud ha dislivet hag he daouarn ruz ha teo flemmet-oll gand an nadoziou bihan rag gwrierez eo a vicher. Emañ o vredi boke-dou ar basion war eur zê evid brava dimezelled a enor ar Rouanez, a lakaint evid ar henta bal euz al lez. En eur gambr ez eus eur paotrig klañv astennet en e wele. Krog eo an derzienn ennañ ha n'eo ket evid padoud ken gand e hoant suna avalou-acour. E vamm n'he-deus netra da rei dezañ nemed dour klouar ha setu perag emañ o leñva. Gwennilienn! gwenniliennig! Daoust hag e vefe posubl dit kas dezañ ar ruby a zo sanket e pommell va hleze? Stag eo va zreid ouz ar hoz sichenn-mañ ha n'on ket evid bale an disterra. »

« Tud zo ouz va gortoz e Bro-Ejipt » a lavaras ar wennilienn. Emañ va heneiled o nijal war-zu ar stêr Nil evid kaozeal da laoudouar an Ejipt braz. Dizale e kouskint e bez ar Roue-Meur. Emañ ar Roue e-unan eno astennet en e arched fichet brao. E gorr a zo lurellaet gand lienennou melen ha bazalmet oll gand spisou flour o c'hwes. Endro d'e houzoug ez eus eur chadenn vên jad gwer dislivet hag e zaouarn a zo heñvel ouz deliou seh.»

« Gwennilienn, gwennilienn, gwenniliennig » eme ar Priñs, Ne vefe ket posubl dit chom ganin an noz ha beza kannad evidon? Ken dizehet eo ar patrig ha ken ankeniet eo e vamm baour.»

« N'on ket evid gouzañv ar baotredigou » a respontas ar wennilienn. « E-doug an hañv tremenet ez eus bet daou ganfard fallagr (mibien ar miliner a oa a gav din) o vatalmi dibaouez mein e-leiz warnon dre ma oan o kouronka er stêr. N'int ket deuet a-benn euz o zaol eüruzamant! Ni, ar gwennili, a zo kement a diz ganeom n'om ket evid beza paket gand traou ken dister, ouspenn, evid pez a zell ouzin, on genidig euz eun tiegez a zo braz e vrud war dachenn ar buander. Koulskoude e oa an dismegañs-se euz ar re feukusa.»

Med ken trist e oa ar Priñs laouen ma tenerraas kalonig ar labous.

« Yen-ki eo an amzer amañ », emezi, « med chom a rin ganeoh eun nozvez all hag e sevenin da gefridi.»

« Bennoz Doue dit, gwennilienn vihan, » a respontas ar Priñs.

Al labous a zistagas, neuze, ar ruby brao diouz pommell kleze ar Priñs hag e nijas kuit gantañ en he beg dreist toennou ar gêriadenn.

Hag ar mên safir a ya kuit ivez

An deiz war-lerh...

« Eur gefridi bennag a hellan ober evidoh e Bro-Ejipt » a youhas al labousig. « Emaon o vond kuit.»

« Gwennilienn, gwennilienn, gwennilienn vihan » a lavaras ar Priñs, « daoust hag e vefe posubl dit chom ganin eun nozvez ouspenn?»

« Tud zo ouz va gortoz e Bro-Ejipt » a respontas al labous. « Va heneiled-me a vo warhoaz o nijal dreist an eil lamm-dour. Ar stêr-Varh a skoach eno e-mesk an haleg hag an Aotrou Memnon a zo o ren, azezet war e gador-roue e granit braz. Diouz an noz beteg ar mintin e par e zellou ouz ar stered, ha pa zeu steredenn ar beure da deurel he sklêrijenn diweza e youh gand al levezek kent chom mud ha difiñv adarre.

Da greisteiz e tiskenn al leoned melen beteg ribl ar stêr evid terri o zehed. Daoulagad o-deus heñvel ouz mein beril ha trouzoush eo o yudadeg eged kroadenn al lamm-froud.»

« Gwennilienn, gwennilienn, gwenniliennig », eme ar Priñs, « Du-hont, en tu all d'ar gêriadenn, e welan eun den yaouank skuiz-divi, en eur zolier. Aspledet eo ouz eun daoliad follennou hag en eur podig en e gichenn ez eus eur boked Sant-Julian dizehet. Bleo rodellet en-deus hag e vuzellou a zo ken ruz hag eun aval greunadez. E zaoulagad a zo huñvreüz. Emañ o tisehi gand an dizesper peogwir ne deu ket a-benn da echui eur pez-c'hoari evid rener ar c'hoariva. Ken yen eo e di ma chom sklaset e vizied ha ne hell skriva an disterra ger. N'eus ket a dan en oaled hag emañ war-nes sempla gand an naon.»

« Chom a rin eun nozvez ouspenn », a lavaras al labousig a oa eur galon aour o lammad en e greiz. « Eur ruby bennag ah-eus c'hoaz da rei din? » — « N'em-eus ket! Siwaz! » a respontas ar Priñs. « Va daoulagad a zo bremañ va oll feadra. Greet int gand mên safir dispar bet degaset din euz a Vro-India eur mil vloaz bennag 'zo. Diframm unan anezo ha kas anezañ dezañ. Gwerzet e vo d'eur braviger bennag ha gand an arhant a vo evitañ e hello ar

paotr prena keuneud ha kas e bez-c'hoari da benn.»

« Priñs ker, » eme ar wennilienn, « n'on ket evid henn ober » hag e tiskord da ouela doureg.

« Gwennilienn, gwennilienn, gwenniliennig », a lavaras ar Priñs, « mar plij, sent ouz ar pez am-eus gourhemennet dit! »

Al lbousig, neuze, a bakas peg en unan euz daoulagad ar Priñs hag e pellaas kuit gantañ war-zu solier ar paour-kéz paotr yaouank.

Ar Priñs a zo dall

« Gwennilienn, gwennilienn, gwennilienn vihan » eme ar Priñs, « posubl e vete dit chom ganin eun nozvez all? »

« Erru eo ar goañv » a respontas ar wennilienn, « ha dizale e kouezo warnom an erh yen. E Bro-Ejipt emañ an heol en e vrud a-uz d'ar palmez glaz. Emañ ar hrokodiled astennet lezireg el lehid o selled tro-war-dro dezo. Emañ va heneiled o paouez ficha eun neiz e Templ Baalbek tra ma vez ar houlmed roz ha gwenn o para anezo en eur hrougousad an eil d'eben. Priñs ker, red eo din kimiadi diouzit, med n'ankounac'hain ket ahanout biken ha pa zeuio an nevez-amzer endro e tegasin dit daou vèn prisiuz euz ar re gaerra evid o lakaad e-leh ar re ah-eus kollet en doare ma ouzom. Rusoh e vo ar ruby eged ar rozenn ruz e strew he splannder ha glasoh eged ar mor glaz e-unan e vo ar mèn safir. »

« War ar blasenn du-hont », eme ar Priñs laouen, « ez eus eur varhadourez alumetez. Eet eo heh alumetez kuit diouti o koueza er riboulenn ha labezet oll int bremañ en he daouarn paour. Ker e kousto d'he ler pa ouezo he zad, ma ne deu ket a-benn da gas eur gwenneg bennag ganti d'ar gêr ha setu perag emañ o leñva ken puill, diskabell, diloer ha diarhenn he-unanig-penn e-kreiz ar blasenn vraz. Kemer va lagad all ha ro anezañ dezi evid mroud ouz he zad d'he hastiza emberr. »

« Chom a rin ganit eun nozvez ouspenn », eme ar wennilienn, « med ne vo ket posubl din paka peg ez lagad all. Dall e vi war-lerh ar wall-oberenn-ze. »

« Gwennilienn, gwennilienn, gwennilienn vihan » a lavaras ar Priñs, « sent ouz ar pez am-eus gourhemennet dit. »

Neuze e pakas peg al labousig e lagad all ar Priñs hag en em strinkas a-denn-askell gantañ en e veg daved ar verhig paour. Ken buan hag hag eul luhedenn e saillas warni hag e tifloupas ar mèn prisiuz e palv he dornig.

« Na pebez gwerennig vraz », a estlmmas ar varhadourez vihan hag hi d'ar red, kuit etrezeg he zi, en eur vousec'hoarzin leiz he dent.

Kefridi diweza ar wennilienn

Neuze e teuas endro ar wennilienn daved ar Priñs. « Dall out bremañ », emezi, « ez an da chom ganit da viken. »

« Arabad, gwenniliennig va halon, » eme ar Priñs paour. « Red eo dit nijal kuit war-zu bro-Ejipt. » « Chom a rin ganit da viken, a lavaran dit », a respontas ar wennilienn hag ez eas da hourvez e-harz treid delwenn ar Priñs.

E-pad an devez e chomas puchet al labousig war diouскоаз ar Priñs o konta dezañ an istoriou plijuz he-doa klevet amañ hag a-hont.

« Gwennilienn va halon, » eme ar Priñs, « dibuna a rez din da zahad marvaillou, med marzusoh eged n'eus forz petra eo gouzañvidigez an dud er béd-mañ. N'eus mister ebed ken mantruz hag ar baourentez. Nij dreist va hêriadenn, gwenniliennig, ha kont din ar pez az-po gwelet. »

Neuze e nijas ar wennilienn dreist ar gêriadenn vraz hag e spurmantas paotred an arhant braz oh ebatal en o hestell tra ma oa

ar glaskerien-vara o kestal an aluzen e-tal toull o doriou prennet. Nijal a reas ivez dreist ar gwenojennou teñval hag e welas dremmou spontet ar vuagligou paour du gand an naon, ken trist ha ken dizeblant hag ar strêdou koz o-unan. Dindan arhou eur pont e oa daou baotrig astennet stok-ouz-stok, an eil e divreh egile, evid miroud ouz o zommder dister da dehoud diouto.

« Na pegen marnaoniet om », a lavarent. « Kasit al lorgnez-se diwar va zro, » a youhe ar gedour-noz, hag e tehent kuit eur wech c'hoaz dindan ar glao.

Dond a reas endro daved ar Priñs hag e kontas dezañ ar pez he-doa gwelet.

« Gwisket on penn-da-benn gand aour prisiuz » a lavaras ar skeudenn. « Red e vo dit dispega anezañ a-dammou ha rei anezañ d'ar re baour. Ar re veo a zo re sanket don en o zoñj e hell an Aotrou Doue rei e dammig peadra da bep hini ahanom war an douar-mañ. »

Al labousig a zispegas follenn-ha-follenn gwiskamant alaouret ar Priñs beteg ma oe dizalaouret oll an delwenn ha ma teuas da veza ken loued hag eul logodenn. Tamm-ha-tamm e tigasas anezo d'ar beorien ken na wellae buan eston yehed ar vugale.

Hag int da hoarzin ha da hoari a-hed ar strêdou.

« Bara on-eus bremañ » a youhent laouen a-bouez o fenn.

Setu erru ar goañv

Erru e oa an erh ha gantañ e skorn kaled. Edo ar yenijenn o ren. Neuze e riellas eston ar strêdou evel ma vije bet skuillet arhant e-leiz warno. Skornennou hir hefivel ouz dagerou strink a oa, eur bamm selled outo, a-ispill dindan kaoniou an tiez. Pep hini a yee rividig gand e hent gwisket gantañ e vantell feur hag ar vugale en eur warezi o dremm e paradoz o frilien a yee da ruzika war ar skorn.

Ar wenniliennig kêz he-doa muih-mui a riou, med kement a garantez a vage evid ar Priñs ma ne felle ket dezi dilezel anezañ. Pa ne veze ket ar bouloñjer war evez e tastume al labousig brunou bara diwar leur ar voulañjerez en eur glask derhel he zommder o flapa krefiv he diouaskell.

Gouzoud mad a ouie, koulskoude, e oa an Ankou didruez ouz he gortoz. Ar peurrest euz he nerz a zastumas evid nijata war skoaz noaz ar Priñs eur wech ouspenn.

« Kenavo, Priñs kaer », a hiboudas. « Ha lezel a rafez ahanon da bokad d'az tom? » a huanadas tristig.

« Kontant-braz on o weled ahanout o vond da Vro-Ejipt, a-benn ar fin, gwenniliennig, med red e vo dit pokad din war va muzellou peogwir e karan ahanout. »

« N'eo ket da Vro-Ejipt e lohan kuit », eme al labousig, « da vro an anaon emaoñ o vond. D'an ifern yen ez a ar gwennili riellet! »

Hag e pokas d'ar Priñs laouen war e vuzellou beteg ma kouezas maro-mik ouz e dreid.

D'an ampoent e strakas eston eun dra bennag e diabarz an delwenn evel ma vije bet frigaset eun tamm anezi. Ar galon blom a oa en em faoutet e daou. Bez' e oa, sur a-walh, eur revenn spon-tuz ha kaled.

An hañv peurbaduz

Abred, diouz ar mintin, war ar blasenn, e oa an aotrou mër ha kuzulierien an ti-kêr o pourmen. Edont o tremen e-biou d'ar peul pa zavas ar mër e zellou war-zu an delwenn: « Va Doue! pegen truilleg eo deuet ar Priñs laouen da veza », emezañ.

« Na pegen truilleg da lavaroud ar wirionez », a heklevas ker-kent moueziou ar guzulierien a-du bepred gand mestr an ti-kêr, hag e krogjont d'o zro da zelled ouz ar skeudenn.

« Eet eo ar ruby kuit euz pommell e gleze. E zaoulagad o-deus greet kemend-all! Hag aour e zillad a zo steuzet », eme ar m'èr.
« E gwirionez n'eo ket gwelloc'h e stad eged hini eur hlasker-bara! »

« Eged hini eur hlasker-bara », a heklevas koradeg moueziou ar guzulienien.

« Hag ouspenn ez eus eul labous maro ouz e dreid », a gendalhas ar m'èr. « Red e vo embann eul lezenn evid miroud ouz al laboused kaoud ar reiz da vervel du-mañ. Ha sekretour an ti-k'èr a skrivias buan ar menoz iskiz-se war e garmed bihan.

Hag e taoljont delwenn ar Priñs laouen d'an traoñ.

« O veza ma'z eo echu he hlinkadurez e vez ivez eet he dalvoudegez da get », a lavaras ar helenner war an arzou-kaer.

Echu ganto al labour-ze, e teuzjont an delwenn e fom eur hovel.
« Pebez tra iskiz! a lavaras, sabatuet-oll, kontremestr an teuzleh d'e vicherourien. « Ar hoz kalon blom-mañ ne fell ket dezi teuzi an disterra er formigell. » Teurel a rejont neuze anezi war eur bern loustoni e leh ma oa dija ar wennilienn varo ouz he gortoz.

« Degasit din-me an daou dra bouezusa euz ar gêriadenn », eme an Aotrou Doue da unan euz e êled vuia-karet. Hag ez eas an èl da gerhad ar galon blom hag al labous maro.

« Eun dibab a-zoare hoh-eus greet » eme an Aotrou Doue. « E liorzou va faradoz e kano al labousig-mañ beteg ar beurbadelez hag ar Priñs laouen a ganmeulo ahanom em hêriadenn aour. »

Oscar WILDE

(The happy Prince)

Troet diwar ar zaozneg gand **J.C. Miossec**

« Pourvoir » Tieu al Lonker-kelien

Piou deuzoutoh 'n-eus soñj deuz Tieu al Lonker-kelien? Gour ebed n'anveze anezañ? Gwir eo n'oh ket alemañ, p'anez-se 'pije dalhet soñj deuzoutañ, pe klevet parlant war e bouez (1), sur! Setu neuze n'ouzet ket petra zo c'hoarvezet gantañ? Ma kar 'vo kontet deoh; ya? Mad, mez a-raog eo red din glebi eun tammig ma zeod. Setu aze! eun taol torch d'ar muzellou ha beh dei.

Ar mintin-ze, kerkent ha digoret e zaoulagad gantañ, 'n-oa santet Tieu e oa eun dra bennag a jañchet en ennañ. E-giz ma vije bet kreñvoh. 'Oa ket 'vid lavar petra 'hoarvezet gantañ, mez ar zantimant 'n-oa deuz eun dra a nevez.

« Me zo deut eun den all deuzouton, » a lavare deuzoutañ e-eun en eur laki e dreid war an douar.

—« N'eo ket gwir 'mechañs! O! Aotrou Doue, e p'leh 'vo greet ar groaz? Poent braz 'oa deoh chañch », a lavare e wreg deuz he zu en eur zével deuz he gwele ivez.

« Petra 'hoarvez gand homañ 'darre? »

« Poent braz, ya, deoh chañch. Me zo eet darn (2) ganeoh, ha n'eo ket eun tammig 'ni eo. N'eo ket tra-walh deoh chom heb goniz gwenneg ebed, mez dond d'ar gêr gand korvajou 'ranket ober ivez. Ken na yet d'ho kwele anez debri. A! bez' oa eur jeorrenn deuzoutoh deh, me lar deoh! »

Egile, a 'n-oa lakeet e zillad, ne lavare ger ebed, nemed grommell 'tre e zent, en eur vond trameg ar gegin. Beteg ar stal-zour (3) oa eet da genta d'evi eul loa-bodad dour, evid laha an tan a oa en e hreuz, ken ne vefe prest ar c'hafè, hag e-mêz goude, 'vid kemer an èr. Azezet war moger ar jardin e soñje:

« Gwir eo, deh zo bet 'vad, mez n'eus ket imm da choul (4) kemend-all anezi, petra. Gast! n'ouzon ket petra 'hoarvez ganin mez, eun dra bennag a zantan en ennon a ne oa ket a-raog. Petra 'r vourhun 'hall beza? Koulskoude 'n em zantan ket klañv. Ma! sao atô!»

'Pad ma oa e tebri e zijuni e wreg 'n-oa lavaret dezañ:

« Aze zo eun tammig douar da dorri evid laki 'val-douar. 'Tog (5) ma voh 'halloh ober an anchou ivez. Me lako an al-douar goud'-ze. N'eo ket ar geid (6) 'voh e ober an dra-ze.

« Gwel't 'vo. Eur banne kafe 'yafe ganin hoaz, sehed 'm-eus.
« Drol a-walh! Ar choftal (7) zo a-dreñv ho kein.»

Debret e lein gantañ 'oa eet da gemer ar rañv hag an trañch, hag e gorr d'al labour, pe ober van atô, 'ta.

A-raog sevel deuz e wele 'n em zante kreñvoh mez n'eo ket 'vid an dra-ze a yee gweloh al labour war 'raog gantañ, tamm toud ebed. Lavar't 'm-eus deoh e oa eun tamm fenean hag eun tamm pipisig (8) ouspenn? 'Gredan ket, yeo? Deut 'oa d'ar poent ma ne gave ket plas mui 'vid mond d'ar mor anezañ. 'Oa e komañs trei da „betit-frère" (9), ma ne oa ket greet dija. Eun tamm mad-da netra petra. Ma! petra 'reoh, 'vid e wreg 'oa ar gwas. Evuruzamant 'doa tamm bugale 'bed anezo, p'anez-se 'vad!...

Eun diskuizadenn 'oa e ober, e foñs gantañ war ar voger, hag e klask petra 'hoarveze gantañ, pa oa deut eur glazard bihan d'heoliki kazimant 'n e gichenn.

M'henn dare hag eñ 'm-eus lavar't deoh e oa mechant ivez, an tamm porteufe-ze (10). Ouspenn beza digivuz (11), ouspenn beza mezhier, eur mell loan droug 'oa ivez. 'Oa ken fallagriez toud anezañ. Pas e-keñver ken kreñv pe kreñvoh evitañ 'vel just. Nann, mez ar re all 'reent ket aon dezañ.

Petra 'n-oa greet dezañ an tammig glazard paoul-ze? Netra! Ken tost hag eñ 'oa da Zoue! N'eus forz! Pugur 'oa mên 'bed gantañ 'zindan e zom 'vid sklapi e-warnañ, 'n-oa lavar't dezañ 'tre e zent en eur zeller deuzoutañ 'kreiz e zaoulagad:

« Kerz kuit alese ».

Hag al loanig bihan kuit raktal 'vad.

« Rezon mad 'teus bet senti, petramant 'vijen ket bet pell e ober dit da afer.»

Petra 'm-eus lavar't deoh? Eun êlig, kea?

'Oa e achui e anchou pa oa deut ar boh-ruzig beteg ennañ, leun a hardiegez, 'giz 'int atô. Hag e tispae an douar evid klask eur preñv pe eur vurugenn (12) bennag. Mez, an dra-ze 'blijer ket d'egile.

« Pa 'to achu foultri (13) din ma labour! Sell a rez deuzouton, tamm añjorn (14). Krev! loan brein.»

Plouf! setu al labousig paoul gourvezet en ant. Maro!

« O! Ma! sell 'ta. Kerkent din lar deñ: Krev! setu-eñ krevet. Tuchantig 'm-eus lavar't d'ar glazard sammi e reor gantañ, hag e-neus greet dustu. Marteze eo an dra-ze 'ni zantan en ennon. Ar « pouvoar » ('ouie ket, an droch-se, 'vez lavar't ar „galloud". Goud a reeh c'hwi?), da lak' al loaned da zenti deuzouton, beteg mervel. Gast! setu aze 'vad!»

Ken na oa red dezañ kravad e benn 'vid lak' an traou da vond endro aze e-barz. Dija 'oa ket deuz ar re vrava anezañ, mez, pa lake beh war e spered, an dra-ze 'zibasee toud. Ken na deue e deod daou houhded (15) e-mêz deuz e veg, hag e zaoulagad e luchi, ken ha ken. Lavar't 'm-eus deoh 'oa ket deuz ar re vrava anezañ, O! nann, tamm toud 'bed 'vad. Vil toud-a-fed a oa me-meze, evid lavar 'r wirionez. Villoh hoaz evid Lomm Fri-teo, setu eo lavar deoh, kea! Del't! evid ober deoh e bortred. Eur fri moan, krog hag hir, beteg koueza en e veg. Hemañ, atô digor-braz gantañ (n'eo ket evid netra veze lavar't al lonker-kelien deuzoutañ), e-giz ma 'n-ije bet vejetasionou (marteze 'n-oa, et da houd), ken na zivere ar ju tabok en traoñ d'e chink. E-euh e fri, ha tost-tost an eil deuz egile, 'oa daou boullig melen, e-giz istr bet fresk eun tammig 'oa, eur c'helh ruz endro da bep hini, hag eur pik du e-kreiz. An dra-ze 'zervije dezañ da zaoulagad. E ziskouarn 'oa ken prop (e-giz ar rest deuz an den) ha ken braz ha re konsort Sant Anton. E vleo, mag 'haller lavar bleo deuz an dra-ze, 'doa ket gwel't nag ar peruker, nag an dour, nag ar grib pe an dirosterez

(16), bloaveziou 'oa. G'ar stoup 'oa gantañ war e benn 'vije bet tra-walh da galafeti pemp pe hweh pinasenn. 'M-eus ket komprenet morse penôz 'ree e gont 'vid delher e gasketenn war e benn. Hag e anal! Hag ar hwez a deue deuzoutañ! Eur spont! Dekoa (17) da lak' ahanoh da gouezi war ho penn-a-dreñv. E zillad 'vad, gwel'd a ret penôz 'hallent beza. 'Oa netra 'bed da lavar deuz e wreg war ar poent-se. Avañsetoh 'ze, kerkent 'oa gantañ dillad prop war e gein, eo red soñjal 'yee d'en em ruiller er henta bern teil 'gave war e hent. Soñjal 'pije greet, tudaj paoul (18), 'yee ar yer da hludi e-wamañ. Bez' oa 'nezo a yee beteg lavar a ouie gwelhi e veg (19) pa veze ar re all e louzi o hini. Da lavar'd d'an ened. Añfin!

Achu gantañ laki beh war e spered, 'oa deut c'hoant dezañ goud beteg p'leh 'yee e « bouvoar », 'giz lavare.

« C'hoant 'mefe mond da êsei an dra-ze war ar c'hê e-ser ober eur bourmenadenn. Marteze, pugur 'teuan a-benn deuz al loaned, e teufen a-benn deuz an dud ivez. Ma! aze 've da hoarzin neuze 'vad. Ale! dem da weler.

Hag eñ 'n e rout.

E wreg, pa 'n-oa gwel't anezañ e vond kuit, 'n-oa lavar't:

« 'Maoh kuit? Da bed eur 'teuoh da glask penn deuz ho mem? Hag e pesort stad?

« Stank deom da veg ha chom (20) ahanon trankil! »

'Oa ket dekoa dezañ beza toud ar pezh a oa, divergont gand e wreg 'ranke beza ivez, ha mond beteg teal 'nezi. Ha hoaz 'n-oa lavar't dezi stanki he beg, ha n'eo ket he genou. 'Vije ket bet jenetoh 'vid an dra-ze anezañ. Evuruzamant e oa-hi e seller e leh all pa 'n-oa respontet anezi, p'anez-se 'vad...

« Ar pezh a zo, a lavare deuzout' e-eun, an tamm mardigra-ze, en eur vond gand e hent, eo arabad din, mag a ran eun urz d'eun bennag, dizoñjal sell' deuzoutañ 'kreiz e zaoulagad. »

Arruet war ar c'hê, ha greet diou pe deir dro gantañ, 'oa eet da bozi e feskennoù war moger Kal Nevez al Laez evid seller deuz ar bagou. 'Oa ket azezet mad anezañ, setu eur welan (21) e tond

en e gichenn war 'r vogel.

Gwelloh 'n-ije greet al labous paoul mond da leh all kar, an tamm sovaj all, dustu planti e zaoulagad en e re, ha lar dezañ:

« Krev! »

Hag ar pokez (22) loanig paoul war e gein er mor, maro-mik.

« A! A! A! a hoarze ar cheulk all en ennañ e-eun, da darzi (23). kea! Dem pelloh, marteze 'vo moyenn da rigoli hoaz. »

War hent an dig (24), 'n-oa ket kavet gwelloh ki Fañch ar Moal, ar gouelier, nemed dond da chalper deuzoutañ.

« Stank deom da henou, sah c'hwenn. »

Penôz 'n-oa ket lavar't: « Krev ». Kazi sur 'n-oa ket soñjet en an dra-ze. N'eus forz, ar c'hi 'oa eet kuit, mud, ha kouillon (25) 'giz reor al loar, e lost gantañ 'tre e baoiou a-dreñv.

An tamm istrogell all a stoke war e vorzedou, tra-walh da lak' anezo da vrondui, kement a blijadur 'n-oa.

Just d'ar morned-ze piou 'n-oa gwel't e tond war e du! Herri « Bout-d'bois », ar charpantour.

« A! deuz hemañ rankan dond a-benn. Mag 'hallan lak' anezañ da bêi din eur banne, 'hallin lavar 'm-eus eur pezh pouvoar. »

Ar pezh 'oa gwir, kar, goud a ret, kenkoulz ha me, n'eo ket êz laki « Bout-d'bois » da ziskranki (26).

« Petra 'lavar an traou, Herri? Mond a ra?

« Feiz! ya 'vad, Tieu, madig a-walh. N'eus ket da glemm. Ha ganit?

« Abeupre ivez. Nemed sehed 'm-eus. Pêi 'rez eun?

« Petra 'lavarez? »

(Gast! fazi 'm-eus greet, a zoñje an amprevan all, eun urz 'ni rankan ober, n'eo ket eur goulen). »

« Me lar dit pèi din eur banne.
« O! 'vel just 'vad! Da biou 'péfen eur banne ma n'eo ket d'am
honsort Tieu.»

Bravaad! Biskoaz 'n-oa lavar't dezañ Herri kemend-all.

« Dem da baki eun, ti Ambroaz.»

Hag int deuz taol en ostaleri.

« Petra 'to, Tieu?

« Eur c'hartañ, kwa.

« A! beñ ya. Kas deom eur chopinadig, Ambroaz, 'tre ma frei
Tieu ha me.»

War wellaad 'yee an traou. Frei bremañ!

Kement hini 'oa en ostaleri a oa souezet e chilou (27) Herri.
Seller a reent an eil deuz egile, e klask kompren petra 'hoarveze
gantañ. Eñ, memez, 'n em houle evid pesort rezon 'n-oa pedet
ar « s'il en reste »-ze (28) da zond da drapi (29) eun. Hag eur
chopinad ouspenn!

Ha blag etrezo o-daou 'vad, e-giz posubl 'vijent bet kamaraded
vraz. Beteg e borteufeull, hag ar pezh 'oa e-barz, 'n-oa diskouezet
(30) ar charpantour da Dieu. Setu eo lavar deoh, hañ!

'Benn eur momed, ha goull e werenn, hemañ 'n-oa lavar't:

« 'Béez gour 'bed mui? Lar dezañ kas deom eun all 'ta.

« Gwir eo, rezon mad 'teus 'lavar, petra eur c'halopinad (31)
'vid daou zen yah! Kas deom eun all da bep hini.»

Ar re 'oa en ti, ostiz hag all, 'oa prest da zempli gand ar pezh a
glevent hag a welent. « Bout-d'bois » e pèi chopinadou! Ha da
biou!

Eun tamm genaoueg, evid diskouel d'ar re all pegen digourdi
'halle beza pa oa eur bannig gantañ 'zindan e fri, 'oa deut beteg
ar charpantour da lavar dezañ:

« Pèi a rez eun, Herri?

« Ha te zoñj dit ganin 'ma an aour war ar radenn (32) 'vid pèi
banneou da gement beg-mezo 'zo?»

Skodeget 'jome ar re all, hag e oa dekoa.

« Ma! hemañ 'ni oar 'nezi 'vad! Goud a ra, koulskoude, gand
piou 'ma e tasadi, lavare eun.

« Hervez ar mod 'zo eun dra bennag etrezo. Marteze egile
'n-eus greet dezañ eur vad bennag.

« Petra? 'maout ket kaer ganti, nann! Hemañ 'n-eus ket muioh
a skiant 'vid eun indu (33) anezañ! Pezavare 'teus gwel't al « Lon-
ker-kelien » e ober vad d'eun bennag, te? Ma welfe eun e koll e
vuhez 'yafe buan da zelher dezañ e benn 'zindan an dour.

« Neuze 'gomprenan ket.

« 'Maout ket en d'eun.»(34)

Hag ar gôz endro dohpenn d'an dra iskiz-se.

'Benn ar fin Tieu 'oa eet skuit.

« N'eo ket poent hoaz tostaad deuz ar yod, Herri?

« N'eo ken unneg eur hanter mez, dem memez tra. En deill all
(35), marteze, 'bo pironed (35) gand om jeorenned.

Herri 'oa mall gantañ trapi ar gêr. 'Oa ket boazet d'evi kement-
se anezañ, hag e oa dija eun hanter skotillad (37) gantañ. Ha,
gwasoh hoaz, aon 'n-oa beza paket eur hleñved bennag kar,
'wele ket dohpenn da betra 'oa e tispign kemend-all a voni (38).
Ha gand piou!

War hent ar gêr, Tieu, evid ései e bouvoar eur wech muioh,
'n-oa goulet gand Sand an treizour, hag eñ ken piz ha « Bout-
d'bois », ober dezañ eun tamm chik. Pa 'n-oa tennet an den e
dabok deuz e chakod, 'n-oa lavar't dezañ ober 'nezañ dezañ
toud, ar pezh 'n-oa greet. Ha koulskoude 'oa evid eun ugent realad
bennag. Bloaveziou zo deuz an dra-ze, hallet konti war-dro pemp
ploaz ha daou-ugent bennag, kar, bremañ, gand ugent real,
pemp kant lur koz, petra, 'peus ket memez eur bluskenn dabok
da lak' en ho peg, pe doujust.

« Boulzeiz! c'hoant 'mefe mond warhoaz da houl argant gand

eun bennag. Marteze en eur bank. Hag evid petra 'yafen ket goude mem?»

Gwel'd a ret pesort soñjou a deue en e benn. (E penn eun all marteze 'vefent deut ivez. 'Zoñj ket deoh?) Kaer 'n-oa beza droch, – eet 'oa e-méz deuz ma spered lavar deoh ne oa ket a-walh dezañ beza toud ar pez a oa, mez deuz penn-diweza ar zun 'ranke beza ivez – memez tra 'teue dezañ soñjou e-giz-se.

'Oa ket pell mui deuz ar gêr anezañ, pa oa kouezet beg-ha-beg gand Per Kemener, an diweza mestr 'n-oa bet. Miziou 'oa a vanke moni dezañ.

Ha Per goul gantañ:

« E pesort soñj 'maout ganin, Tieu? Goud a rez a vankez din eur gwenneg bennag?

« 'M-eus ket dizoñjet, Per. Hab dale 'vi pèet.»

Forz piou 'n e blas, gand ar pouvoar a-noa, 'nije lavar't dezañ ober an dizoñj war an argant-se, hag e-nije greet. Mez lavar't 'm-eus deoh 'oa ket deuz ar re finna, ha pell da veza. Hennez 'oa deut er béd-mañ d'ar zadorn d'abardaez, goude ar hram-pouez. N'eo ken eun tammig goude 'ni oa deut an dra-ze en e spered. Diwezad! Red eo lavar, ivez, 'oa ket e hortoz kouezi war Per anezañ, setu 'oa chomet talbaget. (39)

« Eur wech all 'mo ahanit,» a lavare deuzoutañ e-eun en eur vond gand e hent. Gwel'd a ri-te. Bez' 'mo 'hanit, Per Kemener, hag e-to keuz da da heriou. Petra 'hallfen ober dezañ? Re zous 've lak' anezañ da grevi, kalz re zous evitañ. Eun dra bennag rankon kavoud gwasoh 'vid an dra-ze. Eun dra da lak' anezañ da gaoud keuz beza deut da reklam moni ganin. Boulhast! eun devez 'teuio n'eo ket plijadur a vanko din.

Lavar't 'm-eus deoh 'oa ken mechañstiri toud anezañ.

Arruet 'oa er gêr hag e oa atô e klask pesort droug 'nije hallet (40) ober d'an den all.

Kement a zroug 'oa en ennañ ken na gammjole (41) en eur vond gand an hent.

E wreg, a oa e flapi gand eun amezegez, 'n-oa soñjet dezi e oa boeson gantañ.

« Ale! 'ma ho kont ganeoh adarre, kea? Et da guzi gand ar véz.

« Grez deom peuh te. Ha c'hwi 've propoh deoh kas ho reor ganeoh d'ar gêr, e-leh chom aze da zikoni ha da biki chupennou. Lavar'd a reer fistillerezed, mez ar re-mañ zo diou, gran 'vad.

Hag eñ en ti.

« N'eo ket mezo anezañ, Soaz, a lavare e wreg d'ar vaouez all, en araj 'ni 'ma. Mez deh d'abardaez 'oa gantañ eur reorad spe-zad (42) 'vid dond d'ar gêr, me lar deoh. Ken na dourte.

« Che!... greet peuh 'ta, ma hoarig paoul, ha c'hwi zoñj deoh ma hini zo gweloh. Ha n'ouzet ket, an deiz all a-raog...

'Pad ar mare-ze, an abostol all 'oa eet d'ar gegin war-eeun, d'ober eur bouch d'ar voutaill. E deod 'oa staget deuz e staon ken dizehet 'oa e veg gand ar valis 'oa en e gorv.

« A! ya, Per Kemener, e pesort soñj 'maon ganit a houlez. A-bred a-walh 'weli-te.»

Hag eñ mond beteg ar meleziour a oa 'istribill deuz an nor, ha planti e zaoulagad e re e benn er glasenn.

« Gwel'd a ri-te pa zankin ma daoulagad en da re, ha pa lavarin dit... n'ouzon ket petra hoaz... mez, 'vid ar momed 'lavarin dit: Kerz gand an diaoul, tamm teil!»...

« Petra 'r hoaradenn iskiz-se, Jan? O! sellet pegement a voged 'deu e-méz dre prenestr ho kegin. Ha c'hwez an dev 'gist a zo!
« O! Soaz baoul! 'mechañs 'ma ket ma 'val-douar e leski!»

Hag en eur redez d'an ti da weler.

Amañ 'hallfen achui, mez, koulskoude 'rankan lavar deoh, mag a

zo kalonou tener en ho touez, eo arabad dezo 'n em jali kar, er momed ma oa Jan e vond en ti, Perig-kov-ruz 'oa e sevel deuz e ant. Eun taol strill pe zaou d'e eskilli ha d'e bluñ, hag eñ da glask e voued adarre. D'an ampoent, e-keit ma oa eur c'hi e chalper d'ar vuhez (43), fier-brein beza kavet e vouez endro, eur welan 'n em lakee war he hov evid beza muioh 'n he èz 'vid neu.

N'eo ket brao an dra-ze?

Y. Brusk.
24 a viz mê 1984.

Notennoù:

Brezonég Treboul an hini eo a zo bet implijet gand Youenn Brusk. Klasket e-noa da verka distagadur ispisial ar gerioù dre an doare-skriva. Soñjet on-eus e vefe bet eun doare „poelladenn a yezoniezh“ evid ol lennerien, ha meur a hini ne vefent ket eet beteg penn. Setu on-eus cheñchet tamm-pe-damm doare-skriva an oberour, ha memez tra e chom 43 a notennoù c'hoaz!

Ar pezh on-eus cheñchet:

Adlakaet on-eus ar **z** mud, pa'z om deut boaz toud da gavoud anezañ er skridou, daoust ma ne vez distaget nemed e Bro-Leon.

gand a vez distaget **ga**, ha memez **g'**.

in e dibenn ar verbou pe an araogennoù displeget a vez distaget **-ign** anezañ, implijet ken puill er Vro-Vigoudenn dreist-oll, a vez distaget **neñ**.

deoh a deu da veza **doh**, hag **-oh** an derez-uhelloh **-ah**.

Ar **v** etre diou vogalenn a ya da get aliez-tre; **ivez** a vez distaget **ue**.

vije a deu da veza **vïe**; **an** (kenta gour an amzer-vremañ, **on**, **s** a vez distaget **ch** ha **z**, **ch** hirtin, **ya**, a deu da veza **ia**.

Gwel'd a ri-te: distaget e vez „qwel'd a rit“.

Meur a dra all a vefe da lavared. E-barz an notennoù e vo kavet displegadurioù diwar-benn ar gerioù.

(1) parlant war e bouez: diwar e bouez, diwar e benn.

(2) mond darn: mond skuiz.

(3) Soñj am-eus deuz ar stal-zour a oa er gêr a-raog ma oa bet lakaet an dour er harter. E-giz eur meubl bihan e oa, mez, e-leh koad, eo ridochou koton 'ni oa endro dezañ. Ar zaillad dour, gand al loa-bod e-barz, a oa a-dreñv ar ridochou ha, war-gore, d.l.e. war an estajerenn, e oa eur « guvetenn emaillet ».

(4) N'eus ket imm (ezomm) da choual: n'eo ket red dezi krial. Sañset eo war al laboused, pe ar helien, 'ni vez chouet, ganeom e reer war an dud. Evid al laboused e lavarer « ober chou ». E Traboul, krial (grial) ha leñvi zo gouela. E Douarnenez, evid ar memez tra, e vez leñvet ha vudet.

(5) 'tog: e-doug.

(6) ar geid: voh ket keid-all: 'po ket 'vid pell.

(7) choftal (chaftal e Douarnenez): kafetierenn.

(8) pipisig: mezhvier, beteg staotad en e otou.

(9) Petit-frère: (clochard e galleg). Gwechall e oa leaned o kestal amañ, ha gwis- ket paour a-walh. « Les Petits-Frères de la côte ».

(10) porteufe: porte-faix.

(11) digivuz: dieguz.

(12) burigenn: buzugenn.

(13) foultri: foeltri.

(14) añjorn: Feiz! petra 'lavafen deoh? Eun ano jentil eo, e-giz: cheulk, pe unan 'vel-se.

(15) goulhed: gourhed.

(16) diroster: diroestler.

(17) dekoa: a-walh (marteze diwar ar galleg „de quoi“).

(18) tudaj paoul: tud paour.

(19) e veg: e fas. Ganeom fas ha genou o-deus eun doare gwasauz.

(20) chom: lez.

(21) gwelan: ha n'eo ket gouelan, daoust dezañ beza ar memez labous, zo gwregel ganeom. Liester: gwilini.

(22) pokez: paour-kèz.

(23) tarzi: gand ar blijadur. « Crever le ventre de rire ».

(24) dig: sav-mein.

(25) kouillon: lent. Ha reor al loar a die beza lent peogwir 'n em ziskouez ket morse.

(26) diskranki: tenna moneiz deuz e chakod; da bêa eun dra bennag. Marteze e teu deuz „skragh“ (piz).

(27) chilou: selaou.

(28) « S'il en reste »: « petit-frère ». Pa yee ar vartoloded da werza o fesked da Vrest, ha pa deue mare ar boued, ouie ar « beuti-frered » dond da houll ganto: « S'il en reste, hein! marin. S'il en reste ».

(29) trapi: tapoud.

(30) diskouezet: diskouezet.

(31) kalopinad: eun hanter-chopinad, d.l.e. eur hartad.

(32) « an aour war ar raden ». N'ouzon ket deuz peleh e teu an dro-lavar-ze.

(33) indu: labous-mor. « Puffin fuligineux » e galleg.

(34) en d'eun: (en) da eun (unan). „Ar re all ne gomprenet ket muioh“.

(35) en deill all: er mod all, en daill all.

(36) pironed: pesed («pironeaux, canthares» e galleg. Hag ivez rebechou.

(37) skotill, pe skoutill: « écouteille » e galleg. Skotillad: leun ar skotill. Ha n'eo ket pesked 'n-eus paket Bout-d'bois.

(38) moni: moneiz.

(39) talbaget: chomet heb kavoud e heriou.

(40) 'mije hallet: mie hallet. Ar verb „galloud“ a vez displeget e-giz ma vefe „halloud“.

(41) kammjoli: treuzigella.

(42) eur reorad spezad: eur skotillad, eur gaoteriad, eun toullad.

(43) d'ar vuhez: ken ha ken.

ENDRO DA VANTAN ZANT-JEG

Eñvorennoù

Diouz Porz-Berr d'ar Bourk

An Itron Kogan a gemeras truez douz va mamm, chomet d'an oad a dregont 'la, intañvez-vrezel gand daou a vugale. Kinnig a reas dei, eun ti bihan stag ouz he hini, e bourk Lannjeg. Ha setu perag e kuitais ar Porz-Berr, tantin Jañ-an-Treo hag he levriou burzuduz, feurm tonton Herve hag e loened doñv evid ar stalig-koñvers a vije kavet enni ispiserez, merserez, botoiou-koad, madigou ha kalz a draezou all.

Ya, botoiou-koad a beb ment, evid ar vugale hag an dud vraz, berniet an eil war eben, dirag an daol-gont. Klakou evid ar plahad (22) dalhet in-pign gand eur boentenn vihan sanket en o zalonou war orjalennou astennet etre an treoustou. E-kichenn ar botoiou, eur zahad kafe glaz hag eur zahad sukr-poultr; dindan an daol-gont kasedou leun a brunaoz, pakadou pemp goestad (23) sukr-mèn merket « Say » pe « Chantenay »; ouz troad skalier ar hrignol, eur zahad hollen braz; war an estajerennou 'dreñv d'ar hontour, pakajou gloan, pantouflennou, chaosoniou, rochedou, hivizou, berniou asiedou, bolennou, skullou (24), chopinou gwenn gand barrennoù ruz evid reiñ eul liv kaeroh d'ar jistr.

A beb tu douz an nor, e oa eun dalbenn-stal. Unan doute a veze implijet evel eun ti-gwer rag mamm a blije ar fleur dei. Pa dostae an nevez-amzer, e veze gwelet eno ordinal tri pe bevar bod « Cinéraire ». 'Barz an dalbenn all e veze diskouezet beb sort marhadourez: rochedou evid ar baotred, nidaozioù tull evid kaer-

raad ar prenestrou, delwennou plastr liezlivet evel hini Santez Tereza ar Mabig Chezuz, eur zantez nevez gwell-vrudet e Lannjeg d'ar mare-ze. Gwerzañ a ree ie va mamm koefou simpl ha reou brodet. Beb sun e veze kaset koefou Soaz ha re he mignonezed da feri da Gemper, ti Vai an Ampez. Diwezatoù pa 'mo disket kraped war eur marh-houarn, e vin kaset d'ar yaou d'abar-daez da gerhad ar hoefou feret rag ezomm a veze dioute 'benn ar zul evid mond d'an oferm-bred.

A-hed an deiz, eur podad kafe a domme 'uz d'an tan war ar fourno pe 'barz al ludu war oaled ar gegin... rag pa 'neze greet e varhad peb klient da Soaz a veze pedet ganti da dond 'n e goañze ouz taol ar gegin da gemer eur bannah kafe da lared eo evid ar plahad eur skullad kafe-lêz gand gwestell pe krampouez pe bara hag amann; 'vid ar baotred, eur volennad kafe-mik. Ha mamm ah eve beb taol he bolennad. Ne oa ket ar holl ganti o regali he hlianted rag ar re-mañ a digase dei pa deuent d'ar bourk eur voutaillad lêz, pe eun hanter-dousenn uou, pe eul livr amann pe eur gaolenn da laked 'barz ar zoubenn. Ar goñversanted vihan, d'ar houlz-se, ne oant ket kollet gand ar c'hoant gounid direol a weler hidiv dre-oll. E gliant a oa eur mignon 'vid ar hoñversant, dreist-oll war on mêziou, en on farrezioù bihan. Nag a cheñchamant bremañ!

Eur wech er miz e trem'ne eur veajourien-goñvers. Dond a reent douz kêriou braz an departamant: Gwengamp, Lanuon, Zant-Brieg, Aotronez e oant evidon! Aied a reent en eur wetur-dredan, eun dra ral-tre - d'am zoñj ne oa 'med daou garr-tan 'barz ar barrouz: hini an Aotrou Mèr, ha hini an Ao. Chaloni, eur hentañmestr mekanisian war e leve. Souezet e vezen o weled aotronez gwisket ken kaer, gand o dillad d'ar zul war ar paondez... Med pez a zoueze ahanon ar muiañ a oa pez a veze klenket en o malizennou, peziou malizennou ler, serret gand korreennoù ler ha leun-kouch a varhadourez 'barz ar hiz. Mamm a bellae ar balañsou kouevr hag ar pouezioù potin pozet war an daol-gont evid ober plas d'eur valizenn. Selled a reen, estonet hag evezieg ouz ar beajour-koñvers o tiskoulmañ goustadig ar horreennoù hag o tizoloñ « kased an teñzoriou ». Nag a draou kaer ha divoutin evidon, kalz re gaer evid Lommig. Biskoaz ne dougin-me ar rochedou lien fin, ar jiletennou gloan merinos, ar hravatennoù seiz a diskoueze dim ar beajour, biskoaz ne dougin-me, henn zoñjen, ar pantouflennou gand zolioù ler teñv, ar chaosoniou di-

drouz anvet « silencieuses ». An traou kaer-ze a zo mad evid an Aotrou Yann-Jeg on depute! Ha pesort eston c'hoaz pa gleven an aotronez-ze o hervel ma mamm « Madame » evel an Itron Kogan, hi ha ne veze greet nemed Soaz douti 'barz ar barrouz.

Kemer a reent eur harned hag e skrivent warnañ urz-prenañ va mamm, eur harned iskiz a veze ruzet etre e follennou eur paper glaz hag a dreuztrese pezh a veze kentañ douz lise Zant-Brieg, skolajou Gwengamp ha Lanuon... Ha fier e vezen 'vel just o klevet va mamm o respont de' em-oa bet ar groaz-enor aour pe ar groaz arhant e skol ha fierroh c'hoaz o resev gourhemennou aotronez-kêr.

Eiz deiz bennag goude ma vezent bet trem'net da gemer an urz-prenañ, eh aie ar hamoniou da digas ar varhadourez. Eun eventi evidon ha ma hamaraded. 'Daleg ma klevem trouz ar heflusker o fraoñval 'vid zevel grav skol ar baotred hag ar horn o kemenn d'ar goñversanted e oa an traou o vond d'aied, e halompem da redeg war-lerh ar hamion, diouz eur stal d'eun all, digorbraz on daoulagad ganim war evez da weled pezh a oa renket ennañ pa vefe duoret an dalbenn-dreñv. Ha n'eo ket ar stalioù a vanke er bourk. E peb ti, koulz lared, e veze gwerzet eun draig bennag. Kontet am-eus bet c'hweh ostaleri: an itron Kogan, Pipi ar Baraer, Alexis e harr-goad, Hortañs ha Filoig he c'hoar hag a brepare beb sul ar glaou-koad evid ezañsouer ar person, Moñ-Soez dimezet da Domaz Koz; hag er-mêz douz ar bourk, war hent Keruhel, Lukaz ar mañsoner. Teir ispiserez: du-mañ, ti Varia-an-Diskuiz, ha ti Soaz-an-Treh heb kontañ an ostalerioù eh on o paouez anvañ ane' ha Marharid ar vouloñjerez hag a werze ie sukr, kafe ha madigou. Kinkailleze a veze kad ti Soez-Maiannan ha ti Siz-e-harr-goad. Jañ-an-Eskob a werze butun, dreist-oll butun-fri ha butun-chik hag ar journal « Ouest-Eclair » moulet e Roahon ha muioh lennet en on horn-bro evid « La Dépêche » moulet e Brest. Kad e veze ie, eur wech er zun, « Le Moniteur des Côtes-

du-Nord » moulet war eur paper glaz-gwer, ti Soez Maiannan ha « La Croix des Côtes-du-Nord » ti Soaz-an-Treh. Ma zonton Job a lenne, eur wech an amzer, « La Démocratie Bretonne », eur journal ha ne blijed ket d'ar veleien. Plijed a ree d'am zonton kontañ, 'barz an ostalerioù pa veze krog e benn da vezevenni, an istorioù 'eneb ar veleien e-neze lennet 'ne 'n e journal, ha dreist-oll hini « Soeur Andoche ». Ar skolaer a lenne « Le Populaire » pe « Le Quotidien », ar person « La Croix de Paris ».

Gwestell ha madigou a veze gwerzet dreist-oll ti Soaz-an-Treh. Peb gwener, eur vignonez dei, ginidig euz Treger-Vraz, Janig Bodlann, ah ee war droad en eur voutañ war eur wetur vihan, eun espes landaoz, da varhad Lanon. Retom a ree d'ar gêr war-dro pemp eur d'abardaez, he gwetur karget a foesou a beb sort hag a grakelinoù. Kêrig Lanon a zo bet a-viskoaz brudet-tre evid ar sort gwestell-ze, greet gand bleud gwini, uou, lèz ha sukr-poultr, poahet 'barz ar forn ha piket war o gorre gand leun a doullou bihan. Bihannoh ha kaletoh e oant d'ar houlez-se evid ar re a werzer bremañ ha kalz gweloh hervezon. Debet e vezent gand kafe-lèz, goude bezañ bet lardet gand kalz amann zall.

Eur stalig all hag a blijed d'ar ganfarded oa hini Mai-Vihan-ar-hrav-goz. Eun tamm lochig, koulz lared, war vord an hent a diskenne douz ar vered da Bont-Jeg, med eul lochig hag a veze ordinal ouz toull he dor, war-dro kreisteiz ha d'abardaez-noz, goude ar skol, leun a vugale o hortoz o zro da brenañ « bonbonou ».

A! bonbonou Mai! bonbonou pebret ha bentet, gwenn ha glaz pe ruz ha gwenn, bonbonou bihan ront ha plad ha ne goustent ket ker. 'Vid eur gwenneg toull, Mai-Vihan a garge dorn ar hanfard hag evid eur gwenneg all e hallem prenañ paper « kakamoni » 'vel larem en on galleg trefodet. Treuztreset e veze ar skeudennou liezliveg war goloioù ar haierou – pezh ne blijed ket kalz d'ar skolaer – ha war on daouarn ha war on divreh pezh a blijed dim-ni.

Mamm a chomas da derhel koñvers en ti bihan « Madame » beteg marv he mignonez e 1937. Prenañ a reas neuze stal Soaz-an-Treh e leh ma chomas beteg he marv.

Nag a boan e kemeras e-pad ar brezel 1939-45 evid pourchas bitailladur ha danvezioù d'he hianted. Pemp vloavezh diêz-tre ha

skuizuz eviti med jamez n'em-eus bet klevet 'nei o klemm.

Ha koulskoude pesort torr-penn eviti evid derhel kont douz tikejou lodennet da bep hini, peb miz, hervez e noad: tikejou kafe, tikejou sukr, tikejou eoul ha me oar c'hoaz? Red e veze da gentañ trohañ 'ne war ar hartenmou, o fekañ goude war follennou ispisial, o hontañ hag o hadkontañ, mond da gerhad ar varhadourez en kêr, rag 'pad ar brezel ar varhadourien ne deuent ken da gas an danveziou bevañs-se d'ar werzerien dre-ar-munud. N'o-doa ket petrol, an dra zo zur, med n'o-doa ket ie amzer da goll rag mond a ree gwell-vad an traou gante ha pres a veze ti an darvuiañ doute. Welloh kalz e veze gante gwerzañ o marhadourez in kêr, ha dreist-oll siwaz, d'ar re a-neze amann, kig pe uou da drokañ.

Ha setu perag, eur wech er miz, pa he-deze paket he zikejou, kontet ha hadkontet ane' 'vid prepari dre ar munud he urz-prenañ, e ranke mond da glask eul labourer-douar war ar mêz da vond ganti gand e « charabañ » david he marhadourez en eur gêrig war vord an Treo. Evuruzamant e oa Yann Gergor eun den a galon, prest ordinal da renti servij, Jamez ne nehas outi, e-pad pemp vloaz, mond da gerhad ar bitailladur.

Kuitaed a reent bourk Lannjeg, dustu goude eur vern-abred, war-dro kreisteiz ha pa'h aient e kêr, e veze dija kalz a bres dirag ar stal vraz. Red e veze de' gortoz o zro e-pad eun eur pe muioh c'hoaz. Bezañ e veze eno koñversanted diredet douz ar parrouziou tro-war-dro, ha peizanted gante en o faner vraz eur yar pe eun tamm kig-sall da drokañ ha da dostenniñ d'ar marhadour. Karget leun-kouch e veze ar charabañ da retom d'ar gêr ha 'kerz ar goañvez veze kouezet an deñvalijenn war ar mêziou pa distroent da bourk Lannjeg, leh ma kavent dirag dor ar stal klianted o hortoz ane'. Nag a basianted e veze red kad da reiñ d'an dud da gompren e veze imposubl o serviji dustu... Med aliesoh va mamm en em lóske da vezañ tenerraet he halon ganti hag evid ober plijadur d'he hlianted e roe de' eul lodenn euz o fourveziou-miz.

Ha diwezad war-lerh koan, pa veze retomet Yann Gergor d'ar gêr, e veze eno c'hoaz en he stalig, o klenka hag o renka marhadourez, o jedi priz peb danvez hag o verka 'neañ war peb tra,

o prepari e lod da bep hini, dreist-oll d'ar re e soñje ganti o-doa ar brasa ezomm douz o zammig marhadourez miz. Biskoaz zurmada, ne vije deut ar zoñj dei da gonta e priz gwerza he marhadourez, hini an dizougadur ha hini an amzer kollet ganti war hent ar gêrbenn. Ne gomzan ket douz he gounid. Striz-tre e oa... Ne zoñje nemed da renti servij d'an dud. Re a galon vad he-doa evid bezañ pinvig eun deiz. Digor e oa dor he zi d'an oll ha kement hini ah aie a veze digemeret ordinal 'vel eur mignon. Ar re baour e veze taolet termen de' hag aliez, siwaz, eh ankouaent paea o dle... Ordinal, he-deze eur madig bennag evid ar vugale ha kentoh he-dije dioueret evid losken eur paour en e zienez.

Karet e oa gand he hlianted ha biskoaz, e-pad ar brezel, ne vankas dei na lèz, nag amann, na kig, nag uou. Yann Gergor a ginnige dei, peb pla, eur varrikennad jistr ha toud he hlianted a dalhe menaj a hoveuze trugarekaad anei pa deuent di en eur ginnig dei eun draig bennag douz o feurm.

« Ti an Aotrou Doue » 'vel larer e galleg. Ya, eun ti hag e oa plijuz beva ennañ.

An Itron Kogan ha va mamm a veve asamblez, koulz lared. « Madame » he-doa losket he hoñvers ha feurmet he zi, da gentañ, Jobig-ar-Hig ah eas tri pe bevar bla goude da zerhel stal da Wengamp. War e lerh e teuas eun Tregeriad da hadkregi gand an ostaleri. Kerer e oa ie ar paotr ha zakrist war ar marhad. An Itron a feurmas dañ ar « Rez-an-douar » hag an hadtiez. Mirred a reas 'viti an estaj kentañ hag ar hrignol; med, a-hed an deiz, adaleg ma veze zavet ken 'h aie an eur da vond da gousked, e veze du-mañ. Gwech-ha-gwech all e save eun tammig jeu etre va mamm hag he mignonez rag plijed a ree d'an Itron Kogan komandi ar re all. Mond a ree neuze da vouza 'n he hambr med pa'h aie an eur da vond ouz taol, mamm a lare din:

—« Ale, Lommig, kê da lared da « Vadam » dond d'he mem (pe d'he hoan). »

Ha kerkent e halompen da glask « Madame ».

—« Aï out, Lommig? p'tra nevez a zo 'ta, ma louten bihan? »
—« Laret 'n-eus mamm deoh dond ouz taol. »
—« Ma biz bihan 'n-eus laret din n'eo ket gwir. »
—« O! Madame! ho piz bihan 'n-eus ket klevet pezh a lare mamm. Prest eo mern, laran deoh. Hastet buan dond ganin. »

Hag e kemeren he dorn hag e tiskenne ganin, ankouaet ganti ar fachiri.

Diwezatoñ, e-pad ar vakañsou, eh in ganti da varhad kêrbenn ar hanton. Peb taol eh eem da weled eur hinderv dei, an Aotrou Jan. Hemañ a oa eur hoz paotr yaouank, en pañsion 'barz eun ostaleri brudet. Ha peb taol, e pede 'hanon da chom gantañ da dibi.

Pesort friko evid Lommig! Dibi a reem on mern e kegin an ostaleri, gand ar batronez, eun intañvez, hag he bugale, diou goz plah yaouank ken teñv ha ken ront hag o mamm. Homañ a oa eur pikol pezh plah evel n'am-eus ket gwelet kalz evelti 'n em buhez. Poan he-doa o kerzed, med n'he-doa ket he far da gegina. Gouvezoud a ree mitona meuziou ral ha saouruz. Ma 'pije gwelet Lommig ouz taol, fier 'vel eur paun, eur zerviedenn wenn gantañ endro d'e houg, digor-braz e daoulagad hag e diskouarn, o selled ouz an itron o prepari dañ traou hag a-noa biskoaz tañvaet 'ne c'hoaz, o chilaou istoriou an Ao. Jan o konta e droiou-kamm pa oa oh ober e studi e skolaj Gwennkamp pe o reiñ keloioù da « Vadame » douz tud e famill hag a oa o chom e Keme.

—« Ale, Lommig, eun tammig c'hoaz...hag eur bannah chaoz mad... »

Ha Lommig a debe kalz muioh evid an ordinal, heb ger ebed, sabatuet e-touez ar vourhizien.

« N'on ket estonet, zoñje on faotrig, eo ken ront ha ken lard itron an ostaleri hag he flahad! Ken druz eo ar geustereñ gante! Prejou eured baondez! »

Eñ hag a-neze ar peurliesañ d'e goan nemed patatez ha lèz-ribot. N'eo ket estonuz e plije dañ mond d'ober ar marhad gand an itron Kogan!

Mond a reen ie ganti ti an Aotrou Maze, ar medisin a-noa soañ-gnet ma breh din pa oan kouezet diwar gein « Belline ». N'ouvezan ket hag-eñ e oant kar Madame hag eñ. Med 'n em bleustri a reent a-bell 'zo. Sofij am-eus penaoz, eun deiz, he-doa goullet gand Jobig-ar-Hig prestañ dei e charaban hag e varh da vond da weled an Ao. Maze. Ha piou he-doa karget da vleniañ an harnez? Lommig, 'mechañs. Gwir eo e oan dija unneg pe daouzeg vloaz, d'ar houlez-se.

Red e vije bet deoh gweled ar paotr, ken fier hag eur pabor, eur skourjez gantañ 'n e dorn dehou, ar rañjennou en e dorn kleiz, o huchal war an an'val, ha « Madame » 'n e gichenn, ken fier hag eñ.

—« Marhadmad eo ar hezeg! » zoñje an dud o weled 'hanom o tremen war an hent.

Plijed a ree din mond ti an Ao. Maze. Hemañ a oa eur medisin gouizieg-tre hag eun den madoberuz... eun aotrou ie hag a houzeve bevañ ha kemer e amzer d'henn ober. Mond a ree da weled e glañvourien, war e varh-houarn, e droñsad-medisin war an doug-pakajou, ha staget gand eur haoutchoug a-hed stern e velo, stalabard ar pesketaer: gwaleñnou bambouz, linennou, eur vaz-roued hag eur bidev. Pa dremene war vord eur rivier pe tost d'eur weradenn, an Ao. Maze a harte da daol e linenn en dour ar stêr... ha gwelet am-eus bet 'nañ oh aied er gêr da goulz mern pe koan gand pemp, c'hweh pe seiz luz (25) tapet gantañ, a veze fritet dañ ha d'e gouvidi gand e vatez goz, eur geginerez ampart ma oa unan. Dezougen a ree ie paneradou tokou-touseg bet kutuillet gantañ 'barz ar hoajou. Eul louzaour a-zoare e oa an Ao. Maze. Anaved mad a ree toud louzaouennou ar vro hag implij a ree 'ne da soañgnal e glañvourien. Pa veze bloñset eun ezel bennag, da skwer, e hourhemenne laked war ar vloñsadenn eur plastrach greet gand louzaouenn-ar-groaz, bet fruket ha mesket gand holen braz. Pa vezen diilboued, e lare d'am mamm:

—« Roit dañ d'evañ eur bannahig gwinn santorea, 'raog mond ouz taol, da greisteiz ha da goan. »

Hag eur wech hag em-oa tapet ar paz-yud e hourhemennas reiñ din lèz tomm hag e vije bet betvet roz-êr ennañ.

An Ao. Maze a-noa ie eur jardrin vraz e oa enni leun a wez-freuz (26): gwez pér hag avalou, dreist-oll, a-hed an alezou. Med bezañ e oa ie 'n e jardrin, kerez, gwez-kraoñ ha pengennou sivi. Pa'h aie an hañv e tirede 'vel just war ar gwez, ar moualhi, ar gegined hag an driski d'en em regali gand ar sivi hag ar herez. Difennet mad e oa tennañ warne, med evid oh argas – rag kaer e-noa kared an evned hag o gwarezi douz ar chaseerien – plijed a ree dañ ie kad freuz euz e jardrin da ginnig d'e vignoned ha d'e glañvourien – evid argas 'ne 'ta, e-noa ijinet eun espes brimbalerez d'o spontañ. Stignet e-noa eur rouedad fisel hag orjal etre ar gwez ha staget e-noa in pign oute boestou goulo a beb seurt ment, mein-glaz kouezet douz an toennou, kregin Zant-jakez ha bitaklaj all... Kenstaget e oa ar rouedad ouz eur fiselenn solud-tre hag e teue beteg prenestr e vuro... ha pa wele an evned o pigosad e bér pe e avalou pe o tañva e sivi, an Ao. Maze a jache war ar fiselenn ha toud ar rouedad a gomañse da heja... hag ar boestou hag ar hregin a ree eun talabao ken kreñv ha ken trouzuz ken eh ee kerkent an evned kuit, spontet gand eur stalabardaj ken iskiz ha ken trouzuz.

PAOTR JEG.

(da veza kendalhet)

Notennoù:

- (24) skullou: skudellou
- (25) luz: dluz
- (26) freuz: frouez

Bleun-Brug

Dilun, dimeurz, dimerher...

Rimadellou nevez evid ar vugale

20 lur (200g)

Istor ar Habili

Unnegved pennad

Ganedigez ha deskadurez ar vugale er Habili

Ar Gabiled, evel oll diskibien Mahomet a-hend-all, ne zonont mor-se ar hleier, pe 'vid lavared gwell, n'o-deveus kloh ebed war o moskeou pe templou. Pa zeu eur hrouadur da henel, oll gomerezed ar gêriadenn a gomañs kana *O you ou, ou!*... seurt diskan hag a zo heñvel-braz euz kan ar yer-Indez. Pevar gwaz, daou anezo gand beb a *blīf*, daou all gand beb a *d-tamtam* (eur seurt tambourin, bihannig toud ha skañv-tre), a hoari war eun ton anavezet mad gand ar Vahometaned: *La Allah illa Allah oua Mohammed rousoul Allah*: n'ez eus ken Doue nemed Doue ha Mahomet eo e Brofed. Ar muzik-se a bad e-doug pemp pe zeg minutenn; goude e vez kaset ar zonerien da zutellad d'ar hiohed d'an douar-zao, gand pemp pe zeg gwenneg evid frikota etrezo. Evid koan ez eus evel atao *kouskous*; mez hini all ebed, nemed ar gerent a zo o chom er memez ti gand ar hrouadur nevez-ganet, n'en-deveus gwir da gemer perz er friko *kouskous*. Daou pe dri miz goude, mar deo kreñv ar hrouadur, e vez greet eun hano dezañ, hag evid se ez eus ivez eun tammig gouel, eur guchennad lib-e-bao. D'an deiz-se ez eus *kouskous* e-leiz, deuz gwalh!... An oll gerent, an amezeien, ar Marabout e-unan, a lip o mourrou war-lerh ar houskous en deiz-se! E-pad ar pred e vez muzik ken a gan ar stankennou tro-war-dro. An *tamtam* hag al *lututu* a yal endro e-pad an noz war-lerh beteg pemp pe c'hweh eur antronoz vintin. Pa zigouez d'ar hrouadur kaoud ouspenn seiz vloaz pa vez greet lidou ar *Sirkon-sizion* warnañ, e vez trohet dezañ e vleo oll nemed eur guchennadig e-kreiz e benn. Dre ar guchennad vleo-ze, eme tud ar vro, eo e tle *Mahomet* doned da gerhad ha da zachal ar hrouadur-ze d'e varadoz pa varvo. Oll diskibien Mahomet o-deveus soursi vraz da lezel ar guchennad vleo-ze da zoned an hirra gwella; gwelloh e vez ganto gweled o bugale debret gand ar bleizi pe gand eun aneval all bennag, eged gweled trohi ar guchennad vleo-ze dezo.

Er Habili ar vugale a vez dizonet diwezad-tre. Eun deiz e oan souezet-marzo o weled eur hrouadur tri pe bevar bloaz o reddeg diarhenn war-lerh e vamm en eur choual a-bouez-penn: « Mamm, bronn din!... pe m'ho tourto!» Er vro-mañ ne vez dizonet ar vugale nemed pa vez deuet re hir o dent evid galloud o gouzañv da zena, pe c'hoaz pa zav mez ganto goulenn da zena.

Eur wech dizonet, ar vugale er Habili a zo dilezet gand o zud evel anvealed vud. Ober a hellont ar pezh a dro en o fenn, heb ma hellfer lavared e lavarfe o zad grig ebed dezo. Gwech e vez greet noñfig dezañ, gwech all e vez roet dezañ fest-ar-vaz; ha kement-se oll evid an disterra tra. An tad aliez a gemer plijadur o lezel e vab d'her hanna, evid ober dezañ da gredi eo deut da waz dija. An tad ne hoarz morse a galon vad nemed pa wel e vab o lavared d'e vamm a beb seurt leir-vaich, a beb seurt komzou vil, ha neuze c'hoaz pa wel e vab oh ober d'e vamm dañsal an *tamtam* a-daoliou baz.

Ar vamm n'he-deveus na galloud na vellit ebed war he bugale; mar zigouez dezi o gourdrouz pa reont droug, pe en em zivenn pa vez kannet ganto, malloz eviti!... rag sur eo, pa deui an tad d'an ti, da gaoud bazadou, taoliou daouarn ha taoliou treid leiz he ler. Pedenn ebed ne vez desket d'ar vugale; morse ne vent kaset d'ar moske; ne vez desket dezo heuill relijion ebed. O habestr ganto war o moue, e vent lezet da heuill o oll youlou fall; seul vui e reont azenerez, viloniou, euz din o lavared deoh, seul vui e kav d'o zad o-deveus spered, hag ez int gwir diskibien da Vahomet.

Petra a vad a heller gortoz a-berz eur hrouadur lezet da gemer ar seurt plegou fall-ze a-vihannig toud? Eur wech deuet braz, mestr d'e dad, ar henta tra a ra eo kanna e vamm hag e dad, o lakaad er-mêz euz o zi, ha, war ar marhad, mar kav dezañ e chom re bell e gerent en e houlou, e klask a beb seurt moyennou evid lemel o buhez diganto. Evid kaoud o zammig danvez, eur mab na gren ket evid laza e dad hag e vamm, mar lez Doue anezo da zoned eun nebeud war an oad. Laza eun tad, eur vamm, laza krouadurien nevez-ganet, en eur ger, ober an oll torfejou divennet gand lezenn an oll draou krouet, n'eo ket eun dra iskiz e bro ar Habili; bemdez e erru eun torfed braz bennag e-giz henn e-touez diskibien Mahomet, e-touez an Arabed, koulz hag e-touez ar Gabiled. Me a zo o chom e-touez eur rummad tud ha ne dint ket gwasoh eged ar re all, ha goulskoude ne dremen sizun ebed heb na vefe eur gweled-barn bennag en o zouez. N'eo

ket êz goulskoude lakaad an archerien, ar vidisined, ar varnerien da voned er-mêz euz o ziez, -er vro-mañ eo a lavaran; n'en em zirenkont ket evid nebeud a dra. Pa vez lazet unan bennag, neuze e yelont war al leh ma eo bet greet an torfed; mez evid an taoliou fall, ar gwall-oberou all, ne yelont ket, paneved-se e renkfent beza atao en hent.

Pa vez deuet ar hrouadur d'an oad a zaouzeg, trizeg pe bevarzeg vloaz, hervez ma'z eo kreñv ha braz d'e oad, ez eo dalhet da ober yun ar *Rhomadon* pe koraiz Mahomet. D'ar poent-se en-deveus gwir da vond d'ar *Djema* pe *ti-komun*, ha da zevel e vouez er hoñsail-braz. Mar zigouez dezañ mervel goude an oad-ze, oll dud ar gêriadenn a renk moned da zougen ar hañv dindan boan da baea an *amand*. Er hontrol, ar re n'o-deveus ket greet yun ar *Rhomadon*, n'hellont ket kaoud an enor-ze: n'int ket deuet da wazed c'hoaz.



Daouzegved pennad

Penaos e vez greet an dimiziou er Habili

En tiegeziou pinvidig er Habili, kerkent ha ma vez ganet eur mab bihan bennag, an tad a glask war-eeun eur verhog hag a dle beza pried d'ar mab bihan-ze, diwezatoh, ya!... mar teu an traou da vad. Tad ar paotr bihan a bae da gerent ar verhog yaouank, dirag testou, eun dornad brao a arhant; an arhant-mañ avad a zo diviz d'o rei endro e kenkaz ma tislifje ar verhog yaouank, ma ne fell ket dezi kemer evid pried an hini a zo bet dibabet eviti, e renk paea endro da dad ar paotr yaouank an arhant en-devoa roet hemañ d'he herent, ha war ar marhad, roi eun dornad all a arhant dezañ c'hoaz ken braz hag an dornad a oe roet d'he herent, en dervez ma oa bet dibabet evid pried d'ar paotr yaouank. Er vro-mañ e vez roet atao an tu a-goll d'ar merhed.

En tiegeziou ne dint na paour na pinvidig, etre an daou, ar vugale ne vezont prometet da bried an eil d'egile nemed d'an oad a eiz pe zeg vloaz. D'an amzer-ze o-deveus kofije da loja er memez ti, ar paotr hag ar verhog yaouank. Mez mar tigouez dezo kaoud bugale a-raog ma vent eureujet, kerkent ma o-deveus ar gerent danevell euz eun nevezenti bennag a-berz ar verhog-kaer, e vez greet dezo dimezi, petra 'lavan, eureuji dioustu.

An oll Gabiled a gred ez int galvet da stad ar briedelez. War-dro daouzeg, trizeg, pevarzeg pe bemzeg vloaz eo e vez eureujet ar baotred hag ar merhed yaouank er vro-mañ; me lavar eureujet, rag an darnvuia a vez dimezet a-raog, da lavared eo, o-deveus en em brome-tet an eil d'egile. Mar tigouez gand eur paotr yaouank bennag beza chomet heb beza choazet e bried a-vihanig, ar pez ne hoarvez ket stank, dreist-oll en tiegeziou o-deveus eun tammig madou, an den yaouank e-unan, pe eun all euz e berz, a ya da gaoud tad ar verhog yaouank en-deveus c'hoant da gaoud evid pried. Digouezet e ti ar verhog yaouank, en em chikanont eun nebeud diwar-benn priz ar verhog yaouank; mez goude beza marhatet eun tammig e teuont d'en em glevoud ha da lavared an eil d'egile: « Skoit em dorn, greet eo ar stal! ». Peurvuia e vez greet ar marhad heb gouzoud doare d'ar verhog yaouank; aliez memez ar verhog kêz n'he-deveus na gwelet na klevet komz biskoaz euz an den yaouank a dle beza he fried hag aliez he

boureo. Ma kav d'o zad kaoud eun dornad mad a arhant eviti, ne vezo ket goulennet he aviz evid ober ar marhad, gwerzet e vezo evel ma werzer annoared e foar Gorantin e Kemper. Ar merhed a vez gwerzet a beb seurt priz hervez ar renk uhel euz o herent. Beza ez eus anezo evid deg lur, pemp skoed,, kant lur, hanter-kant skoed; ar herra hini a zo bet gwerzet toud, eo gwreg *Beni-Mengallet*, homañ, a oa koustet pemp kant lur d'he gwaz, a leverer. E-giz n'eo ket gwall ger ar merhed er vro-mañ, lod euz ar Gabiled, ar re binvidig anezo, a bren meur a vaouez dioustu, pa gavont euz ar re varhadmad da bli-joud dezo. -- Goulskoude, hel lavared a rankan evid meuleudi ar Gabiled, e-touez an dud-mañ, ez eus peadra nebeutoh a wazed o kaoud meur a wreg er memez amzer eged e-touez an Arabed. Lod euz ar Gabiled e-leh prena eun azen pe eur mul muioh, evid ober o labour, a gav gweloh kaoud pe brena eur wreg muioh: gweloh marhad a goust dezo, ha muioh talvoudegez o-deveus o kemer eur vaouez, war o meno.

Pa en-deveus an den yaouank en em glevet gand an hini a dle beza e dad-kaer, war briz e verhog, n'en-deveus mui netra da ober nemed dastum pe goulenn arhant da baea an tad evid kaoud e verhog da bried. Eiz deiz bennag a-raog an eured e vez lavaret d'ar verhog yaouank na dle mui moned da bourmen he yaouankiz er-mêz euz an ti, rag ma'z eo dimezet d'an hen-mañ-hen. Pe a vezo mad gand ar verhog yaouank dimezi d'an den-ze, pe na vezo ket, an dra-ze ne ra ket, eur wech ma'z eo prenet ha paeet, eo red dezi kemer an den evid pried, n'eus forz piou eo:

« Eur wech greet an dimezi,
E renker mon'd pe grevi! »

Da zervez an eured, ar mab-nevez, eun nebeud mignonned all d'e heul, a yal da gerhed ar verhog-nevez; digouezet e-tal dor he zi e chomont eno eur pennadig en o zao da hortoz ma teuo an tad-kaer da zigas ar verhog-nevez dre an dorn da gaoud he fried yaouank. Ar verhog-nevez a zo mouchet he bizaj dezi gand eur zeizenn zeiz, pe gand eur mouchouer konton gwenn ha na dle beza divouchet nemed pa vez digouezet e ti he fried yaouank. Ar Gabiled ne gemeront eun dimezi evel eun dimezi peurhreet nemed pa vez lakaet ar verhog-nevez etre daouarn he fried yaouank. Mez kerkent ma en-deveus an tad dispeget euz e verhog evid he lezel etre daouarn he fried nevez, neuze dioustu hemañ a deu da veza he mestr, he fried evid mad; hemañ hiviziken a hello ober ar pez a garo outi, ha pa ve he laza a ve! den ne hello

lavared ger dezañ.

Evid lakaad ar verh nevez etre daouarn he fried e tremen an traou didrouz tre. Ar mab-nevez a gemer e bried dre an dorn, a ra dezi azeza war gein eun azen pe eur mul, eñ e-unan a vleign an aneval dre ar brid, en eur gerzed kostez-ha-kostez gantañ.

E-pad an hent, mignoned an den yaouank a gerz araozañ, war diou renk, mar kerit; war e lerh e teu ar vuzisianed en eur hoari *al lututu* hag an *tamtam* ken e dregern ar stankenn. E-kichenn ar verh-nevez a beb tu dezi, e kerz diou wrañ koz en eur zougen unan eur piadad kouskous, unan all eur pikol piler koar.

Da heul ha war-lerh toud e teu kerent ar verh-nevez hag eun niver braz a dud yaouank, koulz hag a verhed yaouank o choual a-bouez-penn o *you ou ou* spontuz. Digouezet e-tal dor ti ar mab-nevez, he-mañ a zikour e wreg yaouank da ziskenn diwar gein ar mul; mez ar-raog he lezel da voned tre e-barz en ti e ro dezi eun nebeud taoliou baz war he fenn ha war he dioukoaz, evid diskouez dezi piou eo ar mestr. Goude ez eus friko kouskous euz gwalh; kig vez ivez mez ne vez ket braz tamm pep hini: evid kloza ar friko e vez greet eun abadenn fringal ken a lamm al laou hag ar c'hwenn euz dillad an dañ-sourien.

Ar *plij* hag an *tamtam* a vez o sen dezo da fringal.


Ne vez pedet Marabout ebed evid benniga an eured, evid doned da frikota, da ober eur hovad mad a gouskous ne lavaran ket; ma ne vez ket pedet da zebri kouskous, eñ a yal e-unan, ha malloz d'an dud nevez ma n'en-deveus ket an tamm kenta:

« Neb yal d'ar friko heb beza pedet
Ne vezo ket euz ar henta gwalhet.»

Peurvuia an dud nevez goulskoude a bed ar Marabout da zoned d'ar friko eured, evid kaoud an enor da bokad d'e zorn, enor ha ne vez ket roet d'an oll. Pa vez an dud nevez tud devod braz da Vahomet, e pedont memez ar Marabout da lenn dezo eur post pe zaou euz ar Horan pe da roi dezo eur skrid bennag euz al leor-ze.

Er vro-mañ an eureujou a vez greet oll evel kalz euz an eureujou

giz kêr, mar plij, da lavaret eo, heb lidou sakr na netra a gement a ve c'hwez relijion gantañ. Me gav din eo heñvel-braz an dimeziou dre ar vro-mañ euz an dimeziou greet gand ar mêt hepken e lod euz ar hêriou braz e Frañs memez. Evid er Habili ne zoñjer ket da hou-lenn ouz Doue ar hras d'an dud nevez da veva pell an eil e ser egile, rag aliez e vez torret an dimeziou evid an disterra tra. Da vihanna diskibien Mahomet ne jomont ket pell heb kas o gwraez da foar an tri mil diwar o zro, pa ne blijont ket dezo, pe evid lavared gwelloh, pa dro en o fenn. Ar hiz eo, ha lezenn Mahomet ne lavar netra a-eneb, ar hontrol eo a zo gwir.



Trizegved pennad

Penaos e touger ar hañv er vro-mañ

Kerkent ha ma vez unan bennag en e dremenven, eun daou pe dri euz kerent pe mignoned ar hlañvour a yel da gas kelou d'an oll dud er gêriadenn. Ar re-mañ a bign war-eeun war lein o ziez, pe c'hoaz en em vodenn endro da di ar hlañvour, hag en em laka da gana oll er memez amzer, gwazed ha merhed, reolenn a feiz diskibled Mahomet: *La Allah illa Allah oua Mohammed rousoul Allah*. Ar gerent tosta a jom en ti e-tal gwele ar hlañvour beteg ma en-deveus tennet e huanad diweza. Neuze e yelont er-mêz da gana en eun dro gand tud ar gêriadenn: evel diskan d'ar post « *La Allah illa Allah...* » e kanont: « *ya oultenu imma* » « *mamm ma c'hoar* ». Ar moueziou-ze o kana er memez amzer a ra eur cholori heñvel deuz n'ouzon petra; diêz e vefe gouzoud pe gana pe leñva eo a reont. Ar jolori-ze a bad e-pad eun hanter eur goude maro ar hlañvour, ha goude ne glever trouz ebed mui, ken e teu an eur da gas ar horv maro d'an douar. Pa vez achu an abadenn gana, an dud a yal e-barz ti an hini maro. Goude ma vez tennet e zillad pemdez digand an den maro, e vez goloet ar horv gand eul liñser wenn: ne vez ket touchet outañ goude-ze nemed evid e gas d'an douar. Muzulmanted pe diskibien Mahomet o-deveus ar gredenn penaos, pa varv unan bennag, al lutin, pe eun êl fall bennag, a deu da wallgas ar horv maro e-pad an noz. Abalamour da ze, a-raog ma teu serr-nouz, e vez kaset e-mêz an ti kement tra veo a zo e-barz. An dud a yel da glask lojeiz en eun tu bennag ahann da antro-nouz vintin; al loened a vez lezet da voned el leh ma tro en o fenn.

A-raog an interamant, an Omir pe ar mêt a ra kleuza ar bez, hag a embann dre gêr da bed eur e tle beza an interamant, en eur zigas da zoñj d'an dud ez int dalhet da vond da heul ar hañv a-zindan boan da baea eun amand. An Djemaa eo a dle rei peadra evid kaoud ben-vijeri ha paea tud evid kleuza ar bez. Pa vez greet an toull, an Omir a gas urz da zigas ar horv maro da gichenn ar bez. Ar horv, goloet gand eul liñser wenn, a vez lakaet war eur hravez daoubenneg, ha douget gand pevar gwaz; pa vez skuizet ar pevar-mañ, pevar all a gemer o flas. An archedou evid lakaad ar re varo n'int ket anavezet e Bro-Gabili. A-raog ar horv maro e kerz eur guchennadig tud en eur gana war don:

« Peseurt son a ganin-me?
Sonig mond d'am gwele. »

o hanaouenn muia-karet: « *La Allah illa Allah etc...* ». Eur rummad kanourien all a deu war-lerh ar horv en eur gana, war ar memez ton, an diskan: « *oua Mohammed rousoul Allah*. » N'eus forz pegeid e ve an hent ne vez kanet nemed ar postou-ze. War-lerh an eil rummad kanourien e teu kerent an hini maro, e amezeien hag oll dud ar gêriadenn, da vihanna an dud o-deveus an oad da yun e-pad ar Rhomadon.

Ar merhed hag ar baotred n'o-deveus ket c'hoaz an oad da yun, ar re-ze oll ne dint ket dalhet da voned da heul ar hañv, na da heulia nikun euz al lezennou Mahomet. Ken se ne vez ket stank ar merhed o heul an interamañchou.

Digouezet e-kichennig ar bez, ar horv maro a vez diskennet ennañ dioustu, e benn troet war-zu ar Sao-Heol. Prest goude eur Marabout a ziskenn ivez er bez, hag a zizolo e beultrin d'an den maro evid lakaad warnañ eur skrid war behini e vez talfaset en eur mod bennag eur post pe zaou euz lezenn Mohamet. E-pad an dra-ze ar ganourien a zalh mad war o hanaouenn: « *La Allah illa Allah, etc...* ». Ar marabout a-raog pignad er-mêz euz ar bez a laka c'hoaz, en eur horn bennag outañ eur skrid all bennag; war ar skrid e vez lakaet hano ha les-hano an hini maro gand e oll vertuziou, e oll vad-oberou, etc... Evid petra e vez lakaet ar skridou-ze? Mar her goulennit digand ar Gabiled e lavarfont deoh gand rogentez: « Evid mired euz Doue d'en em fazia da zeiz ar varn, gand aon ne deufe da gemer eur *kofour* (eur pagan), pe eur hristen evid eun diskibl fidel da Vahomet; bremañ pa zeskouezfont o faperou, Doue da vihanna a hello gouzoud petra a dleo ober outo. »

A-raog kuitaad ar bez, pep hini a dlee ober eur zalud d'ar horv maro en eur lavared: *Allah okbar*, Doue braz, hag : *salom olik*, salud dit-te! O va Doue, dizoñjet em-eus da gomz deoh euz ar rumm dud ar muia brudet en interamañchou: al leñverien hag al leñverezed.

Ar re-mañ a zo tud hag a leñv evid arhant; ne ouzon ket pegement e koust eul leñvadenn; ar pez a ouzon mad-tre eo e vez paeet tud evid leñva en interamañchou. Ar re-mañ, goude ma vez saludet ar horv maro gand ar henta a en em denn euz kichenn ar bez, a zeh o daelou, ha kerkent ma o-deveus ehanet da leñva, an dud all a zav oll

deuz kichenn ar bez nemed tri pe bevar den: ar re-mañ a zo bet hanvet en deiz a-raog evid goloi ar bez gand eur fouldrenn mên braz. Neuze oll dud ar hañv a yel en eur vouse'hoarzin da zebri kouskous. Ar houskous a dlee beza paeet gand kerent an hini maro, pe gand an Djemaa, pep hini d'e dro. An Omir pe ar mêt eo a ra al lodennou kouskous hag al lodennou bevin; - rag eur bevin a vez lazet evid ar seurt goueliou-ze - peb penn tiegez a gemer al lodenn a zigouez dezañ; mez, peurvuia, e vez droug-kontant euz al lodennou, hag e tiz-roer d'an ti en eur bedi malloziou war neb en-deveus greet al lodennou-ze. Oll diskibien Mahomet a zo kompezet dre ar maro. N'eo ket brasoh na kaeroh interamant eun den pinvidig eged hini eun den paour. Heñvel eo an eil euz egile, nemed en eun interamant pinvidig e weler a-wechou, da heul ar hañv, muioh a leñverien hag a leñverezed. An dud-ze - gwazed ha merhed - paeet evid leñva, a ra o micher en eun doare ar haërra; mez paeet mad a renkont beza, pe netra!... E-pad eun nebeud deveziou goude an interamant al leñverien hag al leñverezed a zeu da heul kerent an den maro, pa deu ar re-mañ da bedi war e vez. Eno e lezont chouadennou ken kreñv, gouest da lakaad da grena an Neñv hag an douar; mez a-veh e vez greet dezo sin da ehana, ma trohont berr d'ar broh. Goude ma vez greet ar bedenn gand ar gerent, ar re-mañ a laka war ar bez pladadou kouskous ha fiez: - ar beorien pe chas ar harter a ra o mad gand ar boued-se. - Ar zoñj euz an dud varo ne loj ket aliez nozvez e penn ar Gabiled: a-benn eun nebeud derveziou, kerent an hini maro a yel adarre d'o labouriou pemdezieg, ken dizoursi, ken laouen ha biskoaz, evel ma n'o-divije kollet hini ebed euz o zud. Daou pe dri devez goude maro e vab uniek, eun Omir a lavare: « O! va mab-me a oa eur paotr stard, sur! Hennez na sponte ket evid moned war droad da gêr a Aljer da werza eoul!! Setu aze eur paotr hag a hounenze din dornadou arhant, avad!... An tad-ze ne gave nemed ar seurt komzou-ze evid keunial d'e vab, evid e veuli, ar mab-ze ma en-devoa kement leñvet ha yudet war e vez, eun nebeud derveziou a-raog. Setu aze penaoz e touger ar hañv er vro-mañ!...

Yann-Loeiz Normand

Al leoriou

Kontadennou ar bobl Fañch an Uhel

An ti-embann **Al Liamm** zo kroget a-nevez 'zo da embann ar hontadennou dastumet er hantved diweza gand **Fañch an Uhel**. Hemañ (1821-1895) e-noa soñjet da genta, en e yaouankiz, gelloud lakaad e ano da veza anavezet e Bro-Hall en eur skriva barzonegou galleg. Med ar vuhez ne ro ket atao d'an den ar pezh a fell dezañ kaoud diganti, da vihanna d'ar poent ma vez o hedal hag er mod ma 'n-eus choazet. Kaer e-noa bet embann barzonegou galleg ha brezoneg, ar re-mañ n'o-doa digaset dezañ tamm brud ebed. Gand eun dra all, hag a ne oa ket o soñjal ennañ, ha kalz diwezatoh, eo e teuas dezañ ar brud a glaske, unan hag a bado pell c'hoaz.

Pa oa yaouankig, e-noa kemeret kalz a blijadur o selaou ar hontadennou a gleve displega diouz an noz, pe er gêr pe e ti eun amezeg bennag, gand tud simpl hag a anaveze mad: eur hemener, eur mañsoner, eun heskener, eur here, eur vaouez koz, eur vatez, eur mevel... hag all... Setu, war-dro ar bloaz 1845, e oa savet c'hoant gantañ da zastum ar hontadennou-ze. Hag e-pad eun daou-ugent vloaz bennag e ouestlas koulz lavared e oll amzer vak da ober al labour-ze, eul labour hag a reas gand eur basianted iskiz hag a dlee digas dezañ ar brud n'e-noa ket gellet kaoud gand e varzonegou.

Gellet e-noa evel-se dastum eun toullad brao a gontadennou. Embannet e-noa meur a hini anezo, med troet e galleg. E brezoneg e-noa greet nebeud, hini amañ hini a-hont en eur gazetenn pe en eur gelaouenn bennag.

Hervez Ronan Huan, Renner moulladuriou Al Liamm, e tle beza embannet peder gontadenn ha tri-ugent kavet e dorn-skridou an Uhel. Henn ober a ray e teir levrenn. Al levrenn genta a zo e gwerz abaoe miz meurzh diweza dindan an titl: **Kontadennou ar Bobl**. Eul levr kaer a 299 pajenn eo.

Ennañ ez eus 19 kontadenn, ar beurrasa anezo (13) hir a-walh, etre deg ha peder bajenn warn-ugent. Ar c'hweh all a zo kalz berroh: unan a zeiz pajenn: **Ar plah a zimezas da eun den maro**; diou a hweh pajenn:

Ar bleiz griz hag **An dañserien noz**; unan a bemp pajenn: **Ar plah hag an naer ganet war eun heveleb tro gand eur wreg**; diou a deir bajenn: **Ar wiz ouez** ha **Yann e vaz-houarn hag an tri jeant**. Ar c'hweh-mañ n'eus e gwirionez e pep hini anezo nemed danvez eur gontadenn kentoh eged eur gontadenn, daoust da ziou anezo, **Ar bleiz griz** ha **Yann e vaz-houarn**, beza bet kontet d'an Uhel gand **Marharid Fulup**, ar vrudeta marteze euz konterezed Bro-Dreger an naontegved kantved.

Souezet e vezer bremañ pa stager da lenn ar hontadennou-ze. Eun tamm poan e vez o tigemered ar béd a vezer taolet ennañ ganto, an dud a vezer lakêt da gaoud darempred ganto hag an traou a weler o c'hoarvezoud enno. On spered deom-ni n'eo ket greet ken evid en em ober ouz traou ken burzuduz, ouz jeanted ken braz, ouz priñsezed ken kaer, ken braz o hened ha ma teu eur sklêrijenn skeduz d'o heul e kement leh ez eont, ouz laboused hag anevaled hag a gomz evel an dud (êgl, bran; gwiz, kaz, bleiz, ki, gavr, bioh, naer, touseg hag all...). Traou evel ar re-ze n'int ket mad ken nemed d'ar vugale, da vihanna henn lavared a reom. Ha c'hoaz e kaver meur a hini hag a zoñj n'int ket mad zoken evid ar re-mañ. Ober a reont, emezo, muioh a zroug eged a vad.

Med souezetoh e vezer goude, pa weler, eur wech eet eur pennad enno, e teuer da gemered eur blijadur iskiz ganto. Roueed, priñsed, priñsezed, tud ar hestell koz, tud ar paleziou kaer, oll tud hag a n'eus ket kalz ken anezo, a en em laka da veva dirazom, dreist-oll dre ma laka ar gonterien anezo da zantoud ha da gêzeal evelto gand eul lañgaj simpl, hini tud pobl Vreiz: roue Kêr-lz n'eo ket disheñvel e gêze e kontadenn **Ar jeant Kolevran** diouz hini kouer Bro-Dreger. Braz eo e zouzenn pa glev Fantig, ar plah koant diwar ar mêz e-neus c'hoant ober anezi e bried, o lavared dezañ e fell dezi e lakfe d'ar maro e varh, Enori, a-raog asanti mond gantañ d'e balez, hag e houlen diganti evel eun tregeriad hag a n'eo ket gwall divorfil: « Ha perag ivez eta, ma Doue? ». Ouspenn zo: ma'z eus roueed, priñsed ha priñsezed er beurvasa euz ar hontadennou, ez eus ivez meur a hini hag a weler enno tud vihan o sevel beteg ar briñsed, ar priñsezed hag ar roueed: mab eur paour-kêz pesketaer, Teodor, ha Yannig e zaou wenneg, eur paotrig hag e-noa ranket, goude maro e vamm, beva eur pennad brao diwar an aluzenn, a zimez pep hini anezo d'eur briñsez hag a deu zoken o-daou goude da veza roue, Yannig, pa varv e dad-kaer, ha Teodor a zo lakêt ar gurunenn dezañ war e benn gand e hini. Eun all, Fañch Skouarneg, ken dibourvez hag an daou-ze, a deu buan da veza pinvidig ha, ma ne zimez ket d'eur briñsez, e hell ober e bried euz pinvidika penneherez ar vro. Evel ar baotred-ze, merhed yaouank diwar ar mêz a zav ivez beteg ar paleziou: Fantig, e kontadenn **Ar jeant Kolevran**; teir merh intañv koz **Paotr-e-Bod-Houarn**, teir merh intañv koz kontadenn **Ar bleiz griz** a gav da zimezi pe eur priñs pe eun den pinvidig. Evelto, med e kêr,

kêr-benn ar vro, teir merh ar baraer. An dud izel-ze, paotred ha merhed yaouank, a zav pe gand o spered lemm (memez Yannig e zaou wenneg, eun tammig diwezad da genta; dond a ra e spered da zigeri tamm-ha-tamm, kerkent ha ma n'eus gwelet touseg euzur ar feunteun o trei en eur briñsez kaer ha muioh c'hoaz goude pa 'deus kuitaet homañ anezañ evid distrei da balez he zad) pe gand eur volonteze kreñv a-walh evid dond a-benn euz an traou a deu da herzel outo war o hent. Ar merhed yaouank, fall (Fantig **Ar jeant Kolevran**; diou verh kosa **Evrig ar wirionez, an dour a dañs hag an aval a gan**) pe vad (ar gwella skwer eo Bihanna, merh yaouanka ar baraer er memez kontadenn) a vez atao ken koant pe ken fin ha ma tigasont pe eur roue pe eur priñs pe eun den den pinvidig da glask o haoud da bried. Memez ar simpla den, eur mevel a hell c'hoari, e-kichenn eur priñs, e vestr, eur roll ken talvouduz ha ma ne hellfe ket ar priñs en em denna heptañ. Ken aliez tro ma vez hemañ e beh, ar mevel eo a denn anezañ euz ar boan.

Konter amzer an Uhel a en em zalhe bepred tost d'an dud a lakae da veva en e istor ha ken tost all d'ar re a veze ouz e zelaou. Beza evel ar re-mañ, eun toullad en e gichenn, diouz an noz, endro d'an oaled vraz, dirag eun tantad-tan kaer, pa veze ar skorn o kregi er-mêz, kleved e vouez o tibuna ar gontadenn, gweled e jestrou o heulia anezi, a dlee poueza pounner war o spered, a-walh evid o derhel evel a-istribill ouz e vuzellou.

Ne heller ket, moarvad, gedal ar gontadenn da ober ar memez efed war ar re hag a ne reont nemed he lenn. Ar re-mañ a vez ganto o-unan. Ne hellont ket evel-se beza dalhet kement ganti. Kemered a hellont goulskoude plijadur a-leiz ganti rag chom a ra enni eul lodenn vad euz ar vuhez a oueze rei dezi ar gonterien. Evid skwer n'eus nemed kemered eur pennad euz kontadenn **Teodor pe ar hastell kouevr** (p. 127), an emgann etre Teodor, ar paotr yaouank, hag an trede euz ar jeanted, breur an daou all e-neus lahet dija, kalz brasoh ha gwasoh egeto. Gweled a reer an emgann evel ma vije e gwirionez dirag an daoulagad. Ar jeant sur da hounid, rag kalz eo brasoh eged ar paotr, a glask skei warnañ gand e falh, heb ehan, gand toud e nerz, en eur daol youhadennou skrijuz. Teodor, pront ha skañv, a lamm uheloh eged ar falh pe a blad ken buan izelloh egeti. Med kaer e-neus ar paotr en em zifreta, e teu eun taol da drehi dezañ e zaou droad. Med ne goll ket e benn, ne goll ket e amzer. Frota a ra warno an ongant a zo bet roet dezañ ha kerkent an daou droad a zo stag en o flas. Teodor neuze, gand eun nerz nevez, a ra eul lamm war-zu ar jeant. Hemañ, spontet, a goll kalon, a falla, hag ar paotr, gand eun taol sabrenn, a zigor e gov dezañ. Eur bajenn gaer hag a zo enni eur vuhez iskiz!

Med santoud a reer a-wechou ez eus e meur a gontadenn traou hag a hoarvez ivez e re all. Ar gonterien a deu dezo, sur, meska tamm pe damm danvez o hontadennoù. Re aliez o-dez da gonta anezo. Evel-se e weler ar hastell aour e kontadenn **Teodor pe ar hastell kouevr** hag en hini **Yannig e zaou wenneg ha priñsez ar hastell aour**. An ermited a zikour ar paotr eet da foeta bro e **Priñsez ar Velandinenn** hag ar voul a ruill en e raog da ziskouez an hent dezañ a gaver adarre anezo e **Yannig e zaou wenneg**. Kavoud a reer c'hoaz, e meur a gontadenn, ar memez roue koz gand e dri mab pe e deir merh, teir briñsez dalhet, e-giz ma lavaront, « indan gazelgê » gand ar memez tri jeant hag a-nez beb tro ar paotr yaouank d'o dilemel diganto. Med, en desped d'an dra-ze, e kemerer atao ar mezez plijadur o lenn anezo.

Fañch an Uhel n'e-neus ket klasket kalz gouzoud euz pe leh e teue danvez ar hontadennoù a zastume. N'e-neus ket greet war ar poent-ze nemed diskouez e oa eno eur gudenn da ziluzia. Med e-leh koll e amzer gand eur gudenn ken diêz dond a-benn outi, evel m'o-deus greet meur a hini abaoe, e-neus kavet gwelloc'h kenderhel da zelaou ar gonterien. Ne felle ket dezañ beza nemed eun dastumer kontadennoù. Hag e-neus greet mad. An dra-ze eo a laka e ano da chom hag ar hontadennoù e-neus dastumet e-leh beza eet da goll a vevo bremañ keid ha ma chomo tud da lenn brezoneg.

Labour mad a ra eta **Al Liamm** oh embann ar hontadennoù bet dastumet keid all 'zo gand an Uhel.

Eur rebech a heller ober goulskoude d'al levrenn embannet.

Ar faziou moulla zo niveruz enni, a-walh evid beza eun tamm kasauz: kavoud a reer eun toullad brao a heriou mahagnet evel „met“ e-leh „me“ (p.162); „a en em glavaz“ (p.174) e-leh „a en em gavas“; „tougesez“ e-leh „touseged“, pa gaver „touseg“ peder linenn pelloc'h; „a darsac'h“ (p. 299) e-leh „a dalc'has“. Geriou a vank a-wechou „unan he zeir c'hraonenn“ (p. 238) evid „unan euz he zeir c'hraonenn“. Geriou all a zo a re: er memez pajenn 238, ar ger „koant“ a deu a-greiz-toud heb rezon ebed etre „e lekaas“ ha „war al lien“, pa 'mañ, med mad eno, diou linenn pelloc'h e „traou koant“. Faziou all a zo c'hoaz evel er geriou-mañ, pajenn 131, en tamm frazenn: „o devoa graet al leon roiñ dezhañ“ el leh ma oa dleet kaoud „en devoa“ e-leh „o-devoa“.

Med an dra-mañ ne vir ket e kav din e plijo levr **Kontadennoù ar Bobl** d'an oll vrezonegrien.

Yves Miossec

(1) **Fañch an Uhel: Kontadennoù ar Bobl /1**, e ti **Al Liamm**.

Dizoloi Enez Eusa da heul Patrig Gouedig

« Ha pa za merhed Eusa da bourmen en douar braz,
Toud e vije lavaret 'vichent pinvidig braz.» (p. 261)

Fichet ma vezent gand mouchouerou seiz degaset dezo gand ar wazed bet er Chin. Ha kompren a reer:

« Merhed Eusa a zo avel en o fenn.» (p. 262)

Marteze, med muioc'h c'hoaz en o enezenn, muioc'h eged a hlao, daoust m'int bet lesanvet „merhed ar glao“... ablamour d'an dizglavier a veze ganto pa zeuent da Vrest, evid diwall o houricher (o hoef) ouz glao an douar-braz!

3.000 devez-arad Enez-Eusa a zo evel eun doare roh er mor, aliez goloet gand ar vruc'henn, heb porz gwirion. Ne vefe ket bet tud enni a-raog Paol kenta eskob Kastell, deut euz Breiz-Veur war-dro 512. Koulskoude „dizo-loet“ e oa bet gand ar Gresian Piteas, war-dro 300 vloaz a-raog J.K.

Patrig Gouedig a zispleg kement-se en e leor, hervez dielloù koz. Pledi 'ra ivez gand eun nebeud sifrou. Eusa, hirio tost da veza douar fraost, a veve enni war-dro 1950 a dud a-raog Dispah 1789; hirio n'ez eus mui nemed eun 1200 bennag. N'eus ket a besketêrien, n'eus ken touristed o tremen eno eun nebeud devezioù, n'eus mui nemed 1500 dañvad, pa oa tost da 6000 e 1856.

En eun eil lodenn, kalz hirroc'h, e ra an oberour gand dielloù „beo“: enrollet e-neus e-pad eurvezioù tud koz an enezenn, tud hag o-deus bevet en eun Eusa disheñvel-braz diouz hini hirio. Ha diwar an enrolladennoù-ze e-neus savet, evel ma lavar, „eñvoriou tud Eusa“.

Rag Eusa a zo bet aret, palet kentoc'h, ha gand merhed dreist-oll peogwir e veze ar wazed er „homers“ pe er „royale“. En amzer-ze, Eusaiz a zeue a-benn da vev ganto o eostou: gwiniz, kerh (bez' e oa 400 penn-kezeg e 1856), patatez, legumachou, foenn, lin zoken. Buhez kaled o turia milieroù ha milieroù a „irvi“ (eun „ero“ a dalv 1,33 ar) strewet dre an enez. E 1956 - n'eus ket c'hoaz 30 vloaz - e oa 120 „stal“; 84% anezo ne bakent ket 10 devez-arad.

Displega 'ra ivez an dud o doareou beva: gwiskamant, boued; gizioù an enez e-keñver an dimezi, an interamañchou, ar gouelioù, ar skol, h.a. Komz a reont euz o darempredou gand „skreved“ Molenez, tud an douar-braz, ar zoudarded „disciplinaires“ bet eno e-pad eur mare. Diskouez a reont pegen braz e oa levezon an Iliz.

Eveljust ez eus kaoz ganto euz ar peñseoù, rag dañjeruz-tre eo tro-war-droioù Eusa. Tud an enez a zo bet mad e-keñver ar beñseidi. Mad ar gwin, ar rom, ar hoad a zeue d'an aot a veze sammet hardiz gand neo a helle lakaad e grabanou warno!

E fin al leor ez eus eun nebeud kanaouennoù anavezet mad en Eusa, hag eur hrennlavar bennag ivez, da heul eun hanter-dousennad kontaden-nou.

En eur zevl e leor gand an divizou e-neus bet gand Eusaiz, e ro deom P. Gouedig da anaoud rannyez an enez. Bez' ez eus gerioù dianav e leh all, evel „koch“ (taro), „teil“ (emichañs)... Lod a denn da yez Kerne: „ato“ (atao), „roñv“ (roevñ), „pez“ (piz bihan); darn a zo distaget en eun doare ispisial: „uhal“ (hel), „kovel“ (govel), „neged“ (eged)... „On“ a dalv aliez „va“; unan bennag a denn d'ar brezoneg a-wechall: „ar wedred“ (ar vered), „godro“ (goro)...

Gand leor Gouedig ez eus tu da studia yez Eusa. Med bravoh, minika-setou a zo bet embannet da heul al leor, evid klevet Eusaiz war-eeun.

K. Riou

Patrig Gouedig: Enez Eusa, Eñvoriou tud Eusa e ti Brud Nevez 60 lur (teir minikasetenn: 60 lur).

Anaoud Bro-Skos dre danevellou gouezeleg Mikael Madeg

Kilt, whisky, klañioù. Evid eur halz a dud, setu bro-Skos. Ha menezioù, deñved du, taouarh, killejen-raden. Ouspenn, „erse“, eur ger a gaver aliez a-walh er gerioù-kroaz galleg.

Gand an danevellou e gouezeleg (an „erse“) lakeet e brezoneg gand **Mikael Madeg**, e reer anaoudegez gand tud ar vro, re ar menezioù, ar

52

geunioù, re an inizi. Tud hag a gomz c'hoaz hirio ar gouezeleg, eur yez keltieg, kar d'an iwerzoneg, mar deo disheñvel-mad diouz ar brezoneg.

Eno ivez e tiwan ar garantez (**Ar galon dorret**), hag ar warizi diwar garantez, en eur béd a huñvre (**Ar melezour**). Ha karantez treh a vo diskouezet **dirag daoulagad an oll...** goude klevet eur gornigell er palud.

Rust eo buhez ar zaverien deñved, rust buhez ar besketêrien hariked. Med mousfent a laouena anezo ivez, ha n'eo ket hepken d'ar zadorn „pa zav mouez yodeg an dud vezo“ (**Devez ar pae**), pa gav tu ar mengleuzier da hoari troioù-kamm d'e wreg kintuz. Pe c'hoaz pa gaser **an ouner** d'an taro.

Med santoud a reer dre oll levezon don ar Bibl, en eur vro puritaned striz, ken striz mar deo „yen“ al leor, zoken pa'z eo tomm an amzer. (Eur **pennad-kaoz**). Kredi a rafed beva gand Job pa weler - rag dispar eo taolennet an êrgelh - pa weler an ozah leun a feiz o pedi a-raog ha war-lerh an tan-gwall en e gêr, ken greduz ma teu e vab-bihan, souezet da genta, da lared eñ ivez amen! (**An treustou**).

Danevellou a-vremañ, med o tigas soñj euz reou all, koz-koz, hag a zo bet kontet gand eur rummad d'egile, a-raog beza erfin lakeet dre skrid. Evel istor Colla, kontet gand eur vamm-goz d'he mab-bihan: « Eun istor am-eus klevet gand va zad-koz, ha kontet gand ar gerioù e-neus-eñ klevet gand e dad-koz dezañ... Ha me a gonto an istor d'am mab-bihan v-unan pa vo deut ar poent », a gendalh ar paotrig. (**Ar morzolioù braz**).

Kavet 'vo amañ „eur béd all“; ober 'reer anaoudegez gand eur hultur all. Mad e-neus greet M. Madeg digori da Vreiziz ar prenestr-se war vro ar Gouezeled. Eun dra vad e vefe bet lakaad da heul eur gartenn euz ar hornad. Med d'or zikour da gompren, ez eus notennoù gand an troer, o rei deom sklêrijenn war voazioù ha gizioù an Gouezelva (ar vro ma vez komzet gouezeleg enni).

K. Riou

Mikael Madeg: Danevellou gouezeleg a Vro-Skos, e ti Brud Nevez 30 lur.

Planedenn

Kelaouenn oll-vrezoneg
o tond er-mêz peder gwech ar bloaz
80 lur

6, ru Longue Montroulez

53

Evid ar vugale: 18 a levriou all!

Leoriou evid ar vugale - ha plijuz ivez d'an dud vraz!- savet ha skeudennaouet gand bugale, hervez an teknikou **Freinet**... Setu danvez liezdoare ar strobard triweh leorig, 16 pajennad e pep hini, nevez embannet gand **Ar Helenner**, ha moulet brao gand **Brud Nevez**.

Komz a ra an „ oberourien “ euz an dud hag an traou a weler andro dezo: o mammig, o zi, kaz-Indez o hlas, otoig - beuzet! - o hamared Huberz... Bez' ez eus eur romantig polis: **Laeron ar Zup**. Konta 'reont buhez eur paour-kêz barveg, gwelet ganto war eur bank-ru bennag, o c'hoarzin dezo. Euruz int gand ar hloun, euruz pa dosta Tadig Nedeleg, p'len em zihizont dindan pennou-teo.

Med barzoniez dreist-oll a ra dezo tridal; ijina 'reont kontadennoù marzuz, faltaziuz eur bamm! Bugale euz Konk-Kerne a gont mignonijaz eur vaotig gand eur pesk-heskenn; reou all, stourm kaloneg eur steredennvor ouz eur zarpant spontuz. Pe c'hoaz: da rouanez ar mor, anoued dezi en izlonkou, mestr an ti hent-houarn a zigas eur treñiad bihan a heoliou-igou - pe heoligou - (treñ karotez pe treñ birinik ar Vro-Vigoudenn?...)

Hag abaoe ar rouanez he-deus tomm, tomm en he rouantelez! Unan a hoanta kaoud eun tropell gwez, da veva ganto... ha da zebri kerez! Eur plahig a garfe beza eur gorriganeg; eur paotr, eun Indian plug war eur marh gouez; kana 'reont mammig, an diskar-amzer, ar garantez, ar galon laouen...

E galleg eo bet skrivet da genta an oll bennadou-ze; lakeet int bet e brezoneg gand **P.M. Mevel** (unan gand **Charlez ar Gall**). Med perag ne vefe ket savet skridou ha skeudennou gand ar skolidi vrezonegerien? Bez' ez eus sur skolêrien oh anaoud an teknikou Freinet hag o kelenn ar brezoneg... Hag o skolidi a zavo e brezoneg barzonegou, kontadennoù, danevellou... ha romantou, ken duduz ha re ar strobard leoriou-mañ. Bez' ez eus bet taoliou êsê gand an Dr Tricoire, ha gand kenstrivadegou Yann Sohier. Hirio ez eus tu da vond war-raog. Beh dezi 'ta!... Ha roit da galanna d'ho pugale ar rummad nevez embannet.

K. Riou

5 lur pep hini, e ti **Brud Nevez**. Gweled ar roll pelloù.

Yezou Bro-Hall ha Kulturioù-rannvro

Eun eil danvez-lezenn gand ar Gomunisted

Evel ma ouezer, ez eus bet kinniget, e miz mae diweza, gand **Destrade, Jospin, Dollo, Ar Peñseg** hag eur hant bennag a zepu-teed socialist all, eun danvez lezenn diwar-benn penaoz kas war-raog Yezou ha kulturioù Bro-Hall. Ha setu ma erru kelou ez eus bet disklêriet eun eil danvez lezenn, hemañ a-zivoud **Yezou Bro-Hall hag ar Hulturiou-rannvro**, ar zinerien o veza **J. Brunhes, G. Ducoioné** hag o henvreudeur euz strollad deputeed ar **P.C.F.**

N'eo ket ar wech kenta, na pell alese, ma weler ar gomunisted oh embann o menoz war an dachenn-ze. Bez' eo bet ar skridou kinniget ganto evid ar hatalaneg hag ar brezoneg, dioustu goude ar brezel, e 1947, o tigeri an hent d'al lezenn Deixonne, bet votet e dibenn 1950. A-hend-all, o-deus disklêriet diou wech lersh-war-lerh, e 1975 ha 77, eur skrid all o talvoud evid ar brezoneg ha kultur Breiz, ha kerkoulz dirag ar Senad ha Kamb ar Gannaded.

E **Disklêriadenn an Abegou** o hinnigadenn ar bloaz-mañ, J. Brunhes hag e vignoned o-deus displeget eun analiz nevez ha dibar a-walh euz ar stad direiz gouzañvet dindan beli eur Frañs kreizenet gand Yezou evel ar brezoneg, an oksitaneg, an euskareg hag all hag ar hulturiou savet diwarno. N'emaom ket o vond da zavel eur vurutelladenn biz diwar-benn ar skrid-ze: abegou euz ar re wella a gaver ennañ, e-kichen barnedigeziou breskoh. Ar pezh a gont, e gwirionez, n'eo ket an dalvoudegez da staga ouz gerioù evel « yezou pe sevenadurioù rannvro » pe « minoreleziou broadel » - ar reolennoù a zoñjer lakaad e-barz al lezenn, hag an doare d'o has da benn, ne lavarom ket: eno emañ ar peb pouezusa, heb mar ebed!

Ha dres, e-keñver an artikloù kinniget gand ar sosialisted deuz eun tu, gand ar gomunisted deuz eun tu all, m'eo disheñvel o frazennou, o faliou dre-vraz a zo tost-tre an eil re deuz ar re all, pa ne vezont ket koulz hag heñvel-mik. Ha moarvad e c'hoarvezfe me-meuz tra ma vefe disklêriet skrid pe skrid all gand eur rummad nevez a gannaded, e-giz m'eo bet roet da gredi gand lod 'zo.

Evelato, heb mond re bell e-touez ar munudennou, gweled a reer ez eus bet lakaet e skrid J. Brunhes muiohig a resizadurioù, e-sell ar Helenn, evid na gaver en hini J.-P. Destrade, - skrid kentañ heñvel, bet kavet re hir, o veza bet skañvaet a galz. Evel-se evid stummi-digez ar vistri, evid ar Zevenadur-rannvro, evid ar skolioù « Diwan » (a vez roet harp dezo a-hend-all). Kredet o-deus deputeed ar P.S. ne oa ket dleet lakaad e-barz al lezenn kement a dennie kentoh ouz tachenn ar « reoliadur », ar « has-da-benn », - tra ma krede da zeputeed ar P.C. e vez surroh lakaad an divizou-ze war-wel en artikloù al lezenn heh-unan.

Gwir eo, merka a heller ar hontrol evid ar media, ar « hleved-ha-gweled », - greet m'o-deus ar gomunisted gand eun artikl nemetken, e-keid ma implije tri artikl ar sosialisted war ar poent-se. Heñvel eo evid implij yezou Bro-Hall e-barz ar vuhez foran, lakeet m'e-neus Destrade eun artikl a-ratoz-kaer evid an dra-ze, tra n'eo nemed meneget gand Brunhes en e zisplegadenn an Abegou.

Or henvroad Erwan Dollo, kannad bro-Zant-Brieg, an hini eo a zo bet karget gand Kevrenn-studi Aferiou Sevenadurel Kambr an Deputeed da zevel ar skrid-dezrevell diwar-benn kudenn Yezou ha Kulturioù Bro-Hall. Fizioud a reom warnañ evid ma vo kavet en e labour ar peb reta, ar peb pouezusa euz ar resizadennoù goulennet ouz ar reolennoù da lakaad 'barz al lezenn da zond. Hag emichañs e vo dalhet d'ar bromesa kaoud war roll labourioù ar Parlamant an tamm lezenn-ze emeur o hortoz abaoe keid-all....

Emgleo Breiz

Kemennou

Une île et d'autres îles

barzonegou gouezeleg euz Iwerzon
gand

Padraig Mac Piarais (1897-1916), Máirtín O Direáin (1910-), Seán O Riordáin (1916-1977), Máire Mhac an tSaoi (1922-), Eoghan O Tuairisc (1919-1982), ha Caitlín Maude (1941-1982).

Troet e galleg evid ar wech kenta, gand Eamon O Ciosáin, hag e-neus savet ar rakskrid ivez. An iwerzoneg hag ar galleg a zo an eil e-tal egile. 128 pajennad. 75 lur ar priz. Embannet gand **Calligrammes**, 18, ru E. Fréron, Kemper.

Lennerien ar brezoneg a oar eveljust zo bet troet kalz muioh a lennegezh gouezeleg iwerzonad e brezoneg eged e galleg. El leor-mañ e vez kavet eul lodenn vad euz barzonegou pouezusa an iwerzoneg er hantved-mañ: pennadoù dudiuz Máirtín O Direáin diwar-benn enez Arainn; barzonegou leun a galon gand Caitlín Maude, enklaskou Seán O Riordáin e béd ar spered, ha dreist-oll „Aifreann na Marbh" gand O Tuairisc, eur barzoneg hir evid ar re a zo maro e tarzadenn Hiroshima.

Klask a ra al leor rei eur zell war eul lennegezh hag a zo chomet dianav er broioù estren.


Abadennoù radio

Adaleg ar 16 a viz gwengolo eh adkrogo **Radio an Arvorig** (Radio-Armorique) gand he abadennoù brezoneg. Diou eurvez ar zizun a vo evid ar mare, etre 10 eur ha kreisteiz, d'ar zul vintin war ar gwagennou etre (422 m). E Breiz a-bez e vo klevet.

Etre deg eur hanter hag 11 eur nemed kart e vo kinniget ar helaouennou brezoneg a vo deut er-mêz e-kerz ar zizun. Kaoz a vo ivez euz al leorioù.

Per Roy

Kaoz 'zo da lakaad eur groaz keltieg war bez **Per Roy**. Ar re o-defe c'hoant da zikour a hell kas arhant da: Per Loquet, Poull ar Feunteun, 29219 Le Relecq-Kerhuon.



58 **YAKAIRN**

KEIT VIMP BEO
oaled ar re yaouank
29112 BRIEG

Leoriou nevez - Advoulladuriou - Leoriou nevez -

Patrig Gouedig: Enez Eusa - Eñvoriou tud Eusa: 60 lur. Teir minikasedenn: 60 lur.

Mikael Madeg: Danevellou gouezeleg a Vro-Skos: unneg danevell troet e brezoneg: 30 lur.

Yves Miossec: Dreist ar mor braz: 30 lur.

Ernest ar Barzig: Buhez ha Faltazi: 60 lur.

Visant Seite: Brezoneg beteg penn: trede leor « Ar brezoneg dre ar Radio »: 15 lur. Eur vinikasedenn: 20 lur.

Tregeriz: Kanaouennoù nevez evid ar re yaouank: 20 lur. Eur vinikasedenn: 20 lur.

Bradbury-Per Mari Mevel: An houadig divalo: 10 lur

Bugale - P.M. Mevel: Ar steredenn-vor vihan wer: 5 lur.

idem: **Va babig:** 5 lur

idem: **D'ar mammouigoù:** 5 lur

idem: **Heoliou bihan ar mor:** 5 lur

idem: **An tropell gwez:** 5 lur

idem: **Ar hloun:** 5 lur

idem: **'Barz ar stered:** 5 lur

idem: **An hini barveg:** 5 lur

idem: **Laeron ar Zup:** 5 lur

idem: **Tadig Nedeleg:** 5 lur

idem: **Me a garfe beza:** 5 lur

idem: **Istor ar pesk-heskenn hag ar vaot vihan:** 5 lur

idem: **Ar pennoù teo:** 5 lur

idem: **Oto Huberz:** 5 lur

idem: **On testennoù kaer:** 5 lur

idem: **Ar rozenn hag ar honikl bihan:** 5 lur

idem: **Titus or haz-indez:** 5 lur

idem: **Korina eo va ano:** 5 lur

idem: **Tadig Fri-Hir:** 5 lur

Bugale - Charlez ar Gall: M'n-defe eun ti gand eul liorz: 5 lur

Bugale - Bugale Hroñvel: Yann-Vari Pennkoad - Ar stivell ha n'houle ken rei dour: 10 lur

Da zond er-mêz dizale

Fañch Broudig: Langue et littérature bretonnes - Dix ans de bibliographie (1973-1982).

Youenn Brusq: Eun haykou bennag: barzonegou gand tresadennoù an oberour e-unan.

Jean-Louis Rolland - Mikael Madeg: Dour an eienenn: eur gontadenn bobl adnevezet. Tresadennoù gand **Joël Jim Sevellec.**

Emile Ernault: Geriadurig brezoneg-galleg (KLT)

Ernault: Dictionnaire breton-français (gwenedeg).

Kavet e vez **Brud Nevez** da brena e ti:

Ar Bed Keltieg, ru ar roue Grallon, Kemper.

Gwalarn, ru des chapeliers, Lannuon.

Breiz, 10, rue du Maine, Paris.

Breiz, 17, ru Pennhoet, Roazon

Kornog, 22, ru ar Vur, Montroulez.

Preñt ol leoriou e-barz ar stalioù-leoriou
Ma ne gavit ket anezo, lavarit d'ar marhadour goulenn anezo
digand

Diffusion Breiz
Hent Gourin
29135 Spezed

